

# BARD HEOL



Miz here 1972

FEUNTEUN PARREZ BULIEN  
PRIZ : 6 LUR

Niv. 74

# KEMBREIZ OC'H OBER TORR-LEZENN EVIT O YEZH

E 1962 e reas SAUNDERS LEWIS, ar skrivagner, ar barzh ha politikour meur Kembre, ur brezegenn er Radio e-lec'h ma tiougane marv ar c'hembraeg a-benn fin ar c'hantved-mañ, mar bije laosket an traoù da vont en o roll, hep klask enebiñ. Ha diouganañ a rae ivez e vije diaes spontus tennañ digant Gouarnamant Londrez lezennoù oc'h adreiñ d'ar c'hembraeg e renk e Kembre krec'h-traoñ; ken diaes, a lavarfemp-ni e brezhoneg, ha tennañ amann eus gouzoug ur c'hi . ( 1 ).

Ken skoet ha kent spontet e voent gant ur seurt diougan m'en em vodas yaouankizoù Kembre, dreist holl studieren ha studierezed, da stourm ouzh ar walenn-a-gastiz prometet d'o sevenadur hag e savjont « Cymdeithas yr I aith Gymraeg », « Kevredigezh ar Yezh Kembraek ». Pennreolenn-diazez ar gevredigezh ez eo homañ : stourm e pep stumm, hep implijañ an nerzh, hep doareoù feuls. Stourm e pep stum, dre derrañ al lezenn ken na vo kemmet, rak direizh ez eo, hag ez a a-enep gwirioù Kembreiz hag ispisial a-enep gwirioù ar Gembraegerien : ober grev an naon ( yun ), azezañ er straedoù, chom hep paeañ ar vigne-tenn o vezan n'emañ e saozneg hepken, chom hep paeañ tailhoù evit ar Radio hag ar Skinwel dre m' az eo re zister lec'h ar c'hembraeg en abadennoù Radio ha Skinwel. Ha dibab mont d'ar prizon kentoc'h eget paeañ an dell-gastiz merket gant ar varnerien. Setu, dre vras, penaos ez eo bet en em gemeret izili ar gevredigezh. Hag abaoe 1967 e c'houlennont groñs ma vo laket da dalvezout e gwirionez « The Welsh Language Act » votet gant ar Parlamant hag a laka saozneg ha kembraeg war an hevelep troad. ( 2 )

Tamm ha tamm ez int aet pelloc'h war hent ar stourm : kement benveg a dalvez da ziskar ar yezh hag ar sevenadur kembraek a zo fall, ha peogwir e reont droug, peogwir ez int binvioù a vac'homerezh ez eus gwir d'o drailhañ. Diskar skritel-loù unyezhek ( saozneg, na petra ' ta ) n'eo mann ebet, o displantañ, o zerrañ, o disverkañ, se n'eo ket pec'hed, pell ac'hano. Antren zoken e studio ar Gompagnunezh - Radio - ha - Skinwel - Granada, e Mankeinion ( Manchester ) ha drailhañ traoù eno n'eo ket difennet kennebeut ha setu m'o deus, tri eus izili ar Gevredigezh, fontet mekanikoù evit ur milion bennak ( arc'hant kozh ). Fred Ffransis, sekretour ar Gevredigezh, en deus tapet evelse daou vloavezh-prizon. ( 3 ) Ha bezit sur n'eo ket un dra fentus bezañ o tebriñ « bara ar rouanez » . . . Evit Fred Ffransis en prizon en enez Wight n'en deus ket, hervez lezenn ar prizonioù, da genskrivañ gant tud ha n'int ket eus e familh, na da resev pakadennoù eus o ferzh; n'en deus ket ar gwir da skrivañ pe da resev lizherou skrivet e kembraeg. Gouarnour an ti-bac'h a gompren a-walc'h pegen kriz ez eo ur seurt stad, met ne c'hell ket mont a-enep d'al lezenn. Heñvel e oa bet kont gant ar bagad reoù yaouank, paotred ha merc'hed bet e Londrez o todioniñ el Lezvarn-Uhel da denañ evezh ar Gouarnamant war direizh der al Lezenn e-keñver ar c'hembraeg : da zibab o devoa, en o zoull-bac'h, pe chom hep degemer bizit o zud, pe komz saozneg ganto.

An holl vruderezh-se avat, ha neuze pledeoù an damallidi e-kerz o frôse-zoù, a zo deuet a-benn da lakaat ur yenn etre al Lezenn hag ar Justis, da lavarout eo, da ziskouez ne glot ket AL LEZENN gant ar JUSTIS; deuet eo al Lezenn da vezañ gwaskerezh ha mac'homerezh a-enep gwirioù mab-den. Enebiezh, kontroliezh a zo etre ar gwir merket ha divizet gant al Lezenn hag ar gwir diazezet war bersonelezh an Den. Neuze emañ al Lezenn da gemmañ, d'ober dezhi klotañ e gwirionez gant ar justis dleet da bep den. Ya, met da c'hortoz, e rank ar « barnerezh » ober e labour, da lavarout eo, gwelout ha miret e vez al Lezenn skrivet pe na vez ket, ha dougen setañsou diouzh se. An torr-lezenn a zo da vezañ kastizet.

Ma ! setu nec'het ar varnerien : seveniñ al Lezenn, pe didamall tud hag a torr-lezenn dre goustiañs, dre ma ouzont emañ ar gwir ganto. Hag an dra souzhus-mañ a zo bet gwelet : ar varnerien oc'h akuitañ an dorrierien-lezenn . . . Menegomp hepken afer an Itron Margaret Davies eus Abertawe ( Swansea ). Unan eus an tri barnerezh a-beoc'h karget da varn ur studier yaouank, Gerallt Rhun; hemañ ne felle ket dezhañ paeañ ar 5 Lur saoz a dell-gastiz skoet gantañ, hag a oa gwelloc'h gantañ mont d'ar prizon. An Itron Davies a oa a-du evit akuitañ ar paotr, an daou all e gondaonas da 15 devezh-prizon. Antronoz ez eas an Itron Davies d'ar prizon hag a baeas ar 5 Lur evit tennañ ar paotr yaouank er-mees. Prezidant al Lezvarn a zougas klemm dirak ar C'hansellour Meur, Lord Hailsham, ret e oa bet dezhi reiñ he dilez. Met o vezañ ma oa krog barnerien all d'ober evel an Itron Davies, ha zoken da akuitañ tamallidi, ez eo deuet neuze ar C'hansellour e-unan da Vangor ( 31 - 07 - 72 ) da zegas da soñj d'ar varnerien e oa o dever seveniñ al Lezenn ha netra ken . . . Ar mizioù da zont a ziskouezo betek pelec'h e sento ar varnerien outañ. Lord Hailsham an deus santet, d'e dro, e oa poent kemmañ al Lezenn, ha dreist-holl, komprenet e oa poent lakaat da dalvezout e gwirionez « The Welsh Language Act ».

Seulvui ma n'emañ ket mui ar re yaouank o stourm o-unan, met tud diazezet evel kelennerien, pastored a zo a-du ganto, ha prest da vont d'an toull-bac'h d'o dro.

Pa ger da stourm evit ur yezh, ne ouzer ket betek pelec'h e vezor kaset, betek pelec'h e vo ret mont. Setu pezh a zo en em gavet e Kembre. Ur stourm sevenadurel ne oa ken, da gantañ : reiñ ur statud ofisiel d'ar yezh war bep tachenn eus ar vuhez publik, kaout skolioù divyeziek hag all . . . Met ret eo stourm avat war gement tachen e-lec'h m'emañ ar yezh hag, hep gouzout dezho, setu degaset izili Kevredigezh ar Yezh Kembraeg da stourm war an dachenn gevredigezhel. Ma setu dre benaos. Bez'emañ ar c'hiz gant kerez da dec'hel diouzh o c'herioù e fin ar sizhun ( ar « week-end » ) evit tremen un nebeut eurioù e peoc'h hag er sioulder, ha pa vez arc'hant a-walc'h ganto, e prenont tiez war ar maez da « week-endiñ » hag ivez da dremen o vakañsoù bras. Ha pa vez frank an arc'hant ganto, ne chomont ket da varc'hata hag e trec'hont zoken war dud ar vro a vije kontant a-walc'h marteze da brenañ an tiez-se, nemet ur briz izelloc'h.

Ar Saozon binvidik o deus graet kement-se e Bro-Gembre ha prenet tiez er bourc'hioù distro elec'h ma'z eo bev mat ar yezh hag ar sevenadur kembraek ha lakaet en argoll ar yezh hag ar sevenadur-se. Hag ouzhpenn, an tiez prenet ganto a chom serret an tri-c'hard eus an amzer, dreist-holl e-pad ar goañv. Setu, dre ret, galvet « Kevredigezh ar Yezh Kembraek » da emellout ergudenn-se adarre. D'ar gwener 7 a viz Gouere 1972, e oa da vezañ e Kernarvon ur werzh vras a diez : 800 a dud yaouank a zeuas da voikotiñ ar werzh; aloubiñ a rejont ar sal, diskar an taolioù, drailhañ ar paperoù en ur huchal ar sloganioù merket war o skritelloù : « N'emañ ket Kembre e gwerzh » ( Nid ydyw Cymru ar werth )

« Arabat deoc'h gwerzhañ Kembre » ( Peidiwch â gwerthu Cymru ). Den ebet, nemet unan hepken hag a zalc'he da youc'hal fuloret e saozneg : « Mezh deoc'h c'hwi, Kembreiz yaouank, Mezh ! Mezh ! Mezh ! », den ebet ne gredas enebiñ outo.

Ar pal kentañ bremañ eo kaout ur chadenn-skinwel e kembraeg. En em rentet o deus kont eus an droug dreist-muzul a ra ar skinwel d'ar yezh ha d'ar spered kembreat, lesanvet ma'z eo bet gant Saunders Lewis : « brasañ muntrer ar c'hembraeg ». « Hag ar pezh a lazher, emezañ, ha pa lazher ur yezh n'eo ket ur yezh hepken, met denelezh an den ». N'eo ket abalamour d'ar yezh, evel pa vefe un tenzor ispisial, emañ paotred ha merc'hed yaouank Kevredigezh ar yezh oc'h aberzhiñ o amzer-da-zont, hag o risklañ mont d'an toull-bac'h : evit an « DEN » e Kembre an hini emaint. Koll e ene ez eo koll ur yezh a zo bet yezh kantvedoù eus istor ur vro. Ur wech kollet an ene, e c'heller ober ouzh an den evel ouzh an hanter loen-gouez, ha n'eus ken ezhomm nemet d'e voueta ha d'e ziduiñ. Ar gammed kentañ evit pezh a sell diskouez resped hag enor d'an « den » e Kembre ez eo respetiñ hag enoriñ ar c'hembraeg ». ( cf Barn, rhif 117, gerffennaf 1972 paj 228 ).

Da lakaat sklaeroc'h o soñj dirak ar bobl ha d'ober bruderezh emañ « Cymdeithas yr Iaith Gymraeg » o paouez embann ur « Manifesto » ( Manifesto yr Iaith Gymraeg ). Mat e vefe d'ar Vretoned studiañ ar « Manifesto-se » ha prederiñ warnañ da gompren gwelloc'h o-unan talvoudegezh ar stourm a renont o-unan, da welout gwelloc'h penaos en em gemerout, rak anaout a rafent gwelloc'h pere eo an enebourien o deus da drec'hiñ : ar Skol, ar Radio, hag an « Debrer-Brezhoneg » : ar Skinwel. Peadra d'ar Vrogarourien da spontañ ha d'ober dezho, neuze, sevel strezo un Unaniezh sakr. ( 4 ).

KLERG.

#### NOTENNOU

( 1 ) Tynged yr Iaith - 13 a viz c'hwevrer 1962.

( 2 ) « Un cas de bilinguisme, le pays de Galles ( A. Kalvez - paj 187 sq )

( 3 ) Barr-Heol niv. 71 Nedeleg 1971 - paj. 30

( 4 ) Manifesto yr Iaith Gymraeg. Leurig 60 pajenn.

Lenn gant evezh ar pezh a lavar diwar benn ar Skinwel, hag an Tiegezhioù digembraek o'n em ziazezañ en toleadoù kembraek paj. 19 - 20 - 21 - 22 . . . Dambrest e vo embannet un droidigezh saoznek eus ar Manifesto. Goulnen al levr :

Swydafa Cymdeithas Yr Iaith  
Ffordd y Môr, Aberystwyth

## Petra a sonj...unan eus lennerezed «Barr-Heol»

Lavaret ez eus bet e oa BARR-HEOL ur gelaouenn enni re a draoù a relijion . . . Kement-se a zo bet lavaret evel ur rebech, ha me a gred e vefe tu da glask abeg er rebech-se. Da gentañ dre ma vefe mat resisaat ar « re » tamallet, ha d'an eil e lavarfen : Ha perak ne vefe ket, e gwirionez, e Barr-Heol, ur gwir spered relijiel ?

Sellomp ha n'emañ ket muioc'h bremañ marteze eget en amzerioù tremet net preder ar relijion gant kalz a dud ? A-gleiz hag a-zehoù e klevet goulennoù war ar rag hag ar perag eus ar Relijion, en ur geñveriañ ar c'hredennoù, an doareoù a-wechall, gant ar c'hemmoù a glasker ober bremañ el lidoù, da skouer. Darn a-du, darn a-enep, hogen diseblant ne vez ket an dud war ar poent-se.

Pelloc'h zoken ez afen. E meur a dra (kuit da lavarout e pep tra ! ) emañ menoz ar Relijion. Ar men oz-se, displann alies, eo a gas ac'hanomp da glask ar « reizh », ar « gwir » a c'halvomp, a hetomp, a c'houlennomp, a zifennomp, evel reolenn - a - vuhez. Ha da gaout piv ez aimp da glask ar reizh, ar gwir, splann ha disi ? Un den, ur mestr, ur rener bennak ? digant ur strollad-tud fiziet enno ar garg da gas an traoù en-dro ? Siwazh ! ne chom ket bev gwall-bell ar fiziañs a lakomp ennañ, pe enno. Arvarus, dañjerus ez eo ar veli etre daouarn un den pe e dalc'h ur strollad. Dougen a ra d'ar mestroniañ, ha tamm-ha-tamm, d'ar gwaskañ, pe dre nerzh, pe dre douell, ha techet ez eo ar re a ren, da lezel a-gostez ar pal diskleriet ha mat, evit klask o gonid, o interest dezho o-unan. Krediñ a ran e santer kement-se, muioc'h eget biskoazh e emsavioù a bep seurt, ha ken niverus ! a zo e pep lec'h. An embannadurioù : kelaouennoù, Radio, Skinwel a ro bemdeiz diskleriadurioù war an holl stourmoù-se.

Piv a rojo dimp eta an diazez don hag asur a-grenn eus ar « reizh » - se a glasker ? Meizañ, santout zoken a reomp a-wechoù, en don donañ ac'hanomp, ez eus un nerzh dreist, ur galloud hep muzul hag en em zispak dirazomp a-greiz-holl. An dud a feiz a ro d'an nerzh-se, d'ar galloud-se un anv : Doue. Hag ar re na reont ket gant an anv-se - pe dre ne anavezont ket, pe dre ma ne fell ket dezho e anv - a rank anzav koulskoude outo o-unan emañ en o c'hreiz, splann pe vorgousket, ar c'hoant, an doug nerzhus-se d'ar « reizh ».

An ezhomm-se a wirionez, a reizhded, a lealded, eo a laka an dud, bremañ muioc'h eget biskoazh, da zifiziout eus gizioù hag a rae ur seurt marc'hadourezh gant an danvez relijiel. Ne c'heller ket lavarout ez eo kement-se un dra nevez. En istor ar pobloù, a gantvedoù da gantvedoù, e kaver an disfiz-se e-keñver ar re a ra o zra-int eus an darempredoù etre an dud war an douar diouzh un tu, ha neuze an Nerzh-dreist-se, andon ar Vuhez, ( pe Nerzhioù kuzh an Natur ) diouzh an tu all. Ar re en em ouestl da vezañ merourien al Lezennoù o ren an darempredoù-se, a zeu dezho alies, an tech d'en em gaout int o-unan a-us d'ar re all.

Ret eo lezenniñ, ret eo kaout reolennoù diskleriet splann o zalvoudegezh evit an holl. Kement-se a zo un dra anat.

Hag evel just, e vezer en-gortoz da welout ar re a zo o c'hefridi diskleriañ al lezennoù pe ar reolennoù-se, bezañ ar re gentañ o sentiñ outo, bezañ neuze evit ar re all, sklerijenn, skouer, skoazell - ha tamm ebet gwaskerezh.

Ac'hanta ! daoust ha ne c'heller ket soñjal - ha gwelout - emañ ar c'hemmoù a c'hoarvez en Iliz ( hag a strafuilh kement a dud ) o tennañ da adreiñ he roll gwirion d'ur veli a zeue da vezañ ur skoilh war hent ar gwir, pa oa deuet ar gwir-se da vezañ disneuziet gant re a c'hizioù strizh kollet o zalvoudegezh ganto, ha deuet da vezañ Lezennoù hep ster ebet ken ? Daoust ha n'emañ ket an dud e-karg o klask a youl-vat, resisaat evito o-unan, ar mennad « servijiñ », evit bezañ evel ur benveg da lakaat ar Gwir da splannaat ?

Gant ar Skiantoù nevez o tegas kement a gemmoù e buhez an dud, daoust ha n'eo ket deuet ar c'houlz da embann ez eo bet roet ar Bed gant Doue d'an dud, dezho da dennañ ampled anezhañ, ya, met hervez ar Sklerijenn ha na c'heller ket diouerout : ar Furnez. Ha galvet eo pep hini d'ar Sklerijenn-se, evit reiñ degemer dezhi, hag he lakaat da barañ evit mad ar re all ivez, pa' z omp holl eus an hevelep andon. Da lavarout eo, ar galloud a zo gant pep hini a zle talvezout da vad an holl.

Ha da c'hras Doue e weler ar seurt preder-se o tonet da vezañ hini tud a youl-vat niverusoc'h - niverusañ - daoust ma'z eus bepred enebiezh. Hag ar pezh a zo bet dizoloet dimp-ni, kristenien, eus « Rouantelezh an Neñv » a glot gant kement-se. Dav stourm avat, hag ar stourm n'eo ket echu c'hoazh : stourm etre Sklerijenn ha Teñvalijenn - zoken e pep hini ac'hanomp, evel etre ar rummadoù-tud . . . Ar c'hoantoù nevez, hep donet a-benn da gaout o gwalc'h ( a-boan ur vunutennig ! ) ha setu ezhommoù nevez o tiwan diwarno.

Krog eo ar rod avat da dreiñ war an tu all : klasket e vez ar sioulder warlerc'h an tousmac'h; difennet e vez kened eeun an Natur goude kement a zistruj diboell; doujañs a ziskouezer e-keñver an dud all goude brezelioù sot, hag a oa o fal gonit evit gonit, dastum evit dastum, koustet a gousto ! O nann ! n'eo ket peurechu al labour; nemet ar pezh a weler eo ne fell ket ken d'un niver brasoc'h-brasañ a dud bezañ touellet, heñchet fall, lakaet da sellout torfedoù evel oberoù mat hag onest.

Hag an holl venozioù-se o tonet eus an ezhomm a Wirionez hag a Justis, a zo warno ul liv relijiel, anat pe displann . O c'haout a reer bemdeiz er skridoù, pe e komzoù ha taolenoù ar Skingomz hag ar Skinwel. Perak eta kaout abeg, mar o c'haver ivez - hag e brezhoneg - en ur gelaouenn evel BARR-HEOL.

## KONTADENN YANN GARRE

Bez'e oa ur wech ur minorig paour, Yann Garre e anv, hag a oa chomet e-unanik d'an oad a dri pe bevar bloaz, pa oa marvet e dad hag e vamm digantañ. Met bez'en devoa ur vaeronez pinvidik ha na oa ket dimezet.

Kemerout a reas he filhor ganti hag e reas hen sevel en he zi, evel pa vije bet he mab dezhi hec'h-unan. Pa voe en oad da vezañ kaset d'ar skol, e kavas anezhañ d'ar skolaj. Gallet en dije Yann, koulz ha meur a hini all, dont da vezañ beleg pe noter. Met troet e oa bet a-viskozh da redek avanturioù, ha se a oa en e spered. War-dro an oad a 19 vloaz, pa zistroas d'ar gêr evit koñje an eost, e lavaras d'e vaeronez :

- Va maeronez ! m'hoc'h eus karantez evidon, n'am c'hasit ket mui d'ar skolaj.

- Perak eta, va filhor, eme e vaeronez. Ne blij ket dit al levrioù ken ?  
- N'eo ket se eo, va maeronez; ar pezh a zisplij din eo bezañ azezet dalc'hmat en ur sal-skol. Neuze e kavan hir an amzer.

- Petra'out e-sell da ober, va filhor ? Petore micher ac'h eus c'hoant da gemerout ?

- Me 'vo martolod.

- Mat-tre, Yannig Karre, eme e vaeronez dezhañ. Gwelloc'h e vije bet ganin da welout o chom em c'hichen, met n'houlan ket mont enep d'az c'hoant. C'hoant ac'h eus da vont war vor ? Mat eo, kae war vor. Me'ya da lakaat ober dit ur vatimant vat, rak ne fell ket din ez afe va filhor war vor, evel martolod ha netra ken. C'hoant am eus ma vi kabiten diouzhtu. Te da-unan a choazo goude da vartoloded ».

Daoust ma n'en devo ket Yann Garre labourer kalz er skol, e oa desket a-walc'h evit tremen da gabiten. Tremen a reas e eksamin-kabiten da c'hortoz ma vije prest ar vatimant da vont war an dour.

En deiz ma voe benniget ar vatimant, e lavaras Yann Garre d'an hini a oa bet ken mat evitañ a-viskozh :

- C'hwi eo va maeronez. Mar plij ganeoc'h, e viot ivez maeronez va batimant.  
- Mat eo din, va filhor, eme e vaeronez.

Neuze e voe skrivet war ziadreñv ar vatimant an anv « BARBAIKA », rak hennezh e oa anv an dimezell vat. Ne lavarin ket deoc'h pe e oa ar vatimant-se ur oueletenn pe un teirgwern, met ar pezh a zo sur eo e raer enor d'ar re o devoa graet anezhi. Hag ar chañs dreist-par he devoe ivez da gaout ur c'habiten eus ar re wellañ : Yann Garre.

Displeget e voe al lien hag ar « Barbaika » war-raok er mor. Doue da reiñ dezhi beaj vat !

C'hoant a savas da Yann Garre da ober ur veaj daou vloaz e morioù ar

C'hreisteiz . . . Tremenet mat-dispar e oa bet ar 16 miz kentañ : brav an amzer, dous ar mor, an avel a-du.

- N'eo ket a-walc'h, 'me ar c'habiten yaouank. Moarvat e vijec'h kontant da vont d'ober un tamm tro betek ar gêr. Bremañ 'ta ez eomp da dreñ beg al lestr war-zu Breiz-Izel.

Hag a voe graet.

Gwelout a raent dija er pellder douar ar vro :

- Deomp war bennoù hon daoulin, eme Yann Garre, ha trugarekaomp an Aotrou Doue da vezañ roet dimp beaj vat ».

Met ur martolod hag a oa e beg ar wern, a respontas dezhañ :

- 'M eus aon, kabiten, emañ ar pep gwashañ dimp da gaout . . . Gwelout a ran ul lestr o tont war-zu ennomp, ha n'eus seblant vat ebet gantañ.

Ha Yann da dapout e lunedenn hirwel ha da sellout en tu ma tiskoueze ar martolod :

- Ya, 'm eus aon, ez eomp da gaout da ober gant ur preizher-mor !  
Oc'ho ! Paotred, bezomp war-vezh ».

Ar « Barbaika » a savas he banniel da veg ar wern, met d'erc'hel a reas ar morbreizher da zont war-zu enni, hep respont d'he salud.

- Mat eo ! a c'hrozmolaz Yann Garre. Hemañ en deus ezhomm da vezañ kenteliet. Hag e vo ! Hag e kousto un tamm mat ar gentel-se dezhañ ».

E bourzh e lestr e oa daouzek a bezhioù-kanol bras, rak e vaeronez he doa graet an traoù eus ar c'hentañ. Asambles e laoskas tennoù an daouzek kanol. Ar morbreizher hag a soñje gantañ en devoa d'ober gant ur vatimant-a-goñvers ne oa ket en-gortoz da vezañ saludet er c'hiz-se. Teir gwech e teuas en-dro warnañ e-unan, ha gouelediñ.

Ne oa ket Yann ur paotr fall. Reiñ a reas urzh da ziskenn ar bagoù bihan evit saveteiñ an dud a oa chomet bev war vatimant an enebourien.

Gant al laeron-vor e oa tri-ugent plac'h yaouank eus ar re gernañ :

- Eus a belec'h hoc'h eus bet ar merc'hed-se ? a c'houlennas Yann Garre ouzh mestr al laeron-vor.

- O laeret hon eus.

- Ha da belec'h edoc'h o vont ganto ?

- O vont d'o gwerzhañ edomp ».

E-touez ar c'hantenned-se e oa ur brîñsez ha na seblante ket bezañ ouzhpenn 17 pe 18 vloaz. Fresk e oa he liv, ruz-ruz e oa he c'hroc'hen, melen he blev, ha siklaer he daoulagad en he fenn evel an oabl glas. Ganti e oa he flac'h-a-gambr a zalc'he mat dezhi.

- Pegement e werzhfec'h din ar brîñsez yaouank-se ? eme Yann Garre.

- Peogwir hoc'h eus hor saveteet, eme gabiten al laeron-vro, me' lezo anezhi ganeoc'h evit mil skoed.

- Hag ar plac'h-a-gambr ?

- Me'roio anezhi deoc'h war ar marc'had. Nemet e c'houlennan ouzhoc'h hon diskenn en douar yac'h ha dibistik, kentañ porzh-mor a gavimp.

- Graet eo ar marc'had, eme Yann Garre » Ha raktal e roas mil skoed.

Kentañ porzh-mor a gavjont, e lezas ar vorlaeron da ziskenn en douar, yac'h ha dibistik. Hag eñ neuze da skeiñ gant e vatimant war-zu ar porzh ma tlee dizarmañ. Eno e klaskas lojeiz d'ar brîñsez ha d'he flac'h-a-gambr, en ostaleri wellañ, hag e fizias anezho e madelezh an ostiasez. Hag eñ neuze e kmerout ur marc'h, ha war-raok betek ar maner'lec'h m'edo e vaeronez o chom . . . Stad vras a oa enni, a c'hellit krediñ, ouzh hen gwelout.

- Ac'hanta ! emezi, goude hen stardañ war boull he c'halon. Petra zo a-nevez ganit ?

- O nebeut a dra ! Nemet ur marc'had am eus graet.
- Petore marc'had ? emezi.
- Feiz ! aon am eus ne blijo ket deoc'h.
- Lavar bepred, emezi.
- Deuit ganin hag e welot, emezañ.

Ne voe ket ret he fediñ div wech. P'erruas en ostaleri ha pa welas ar briñsez, diouzhtu ec'h en em dommas outi.

- Pegoulz e vo an eured ? emezi o treiñ war-zu Yann Garre.
- Pa blijo ganeoc'h, va maeronez, emezañ.
- O neuze, ar c'hentañ ar gwellañ, emezi.

Pemzek deiz goude, e voe graet an eured. Me' lavar deoc'h e oa bet un eured kaer. Trizek miz goude, ar briñsez he devoe ur c'haer a baotr bihan hag a was anvet Yann Barbaig.

Yann Garre, an tad, a chomas daou vloaz gant e vaeronez, e wreg hag e vab, leun a garantez evito. Met en drivet bloavezh e teuas da vezañ melkoniet evel un den hag a gav hir an amzer.

- Un dra bennak a zo o c'hoari ar c'hontrol ouzhit 'm eus aon, eme e vaeronez dezhañ un deiz bennak.

- Ya, va maeronez ! Ar mor an hini a vank din.
- Penaos ? Gant se an hini emañ da benn ? Dilezel a rafes da wreg ha da vab ? Ne gomzan ket diwar va fenn-me hag a zo da vaeronez ha netra ken !
- Petra' servij deoc'h, va maeronez ! N'on ket graet evit bevañ e korn an oaled, evel kalz a re all. Va lezit da vont da ober ur veaj c'hoazh. Neuze e teuin en-dro hag e chomin ganeoc'h.
- Prometiñ a rez eta e vo honnezh an diwezhañ beaj a ri ?
- Ya ! prometiñ a ran.
- Ac'hanta ! kae war-raok ».

En noz-se end-eeun e lavaras ar vaeronez d'ar briñsez edo Yann Garre o vont war vor evit ar wech diwezhañ.

- Ac'hanta ! eme ar briñsez, peogwir emaoch o vont war-raok, bezit ar vadelezh da lakaat liveañ war ziadreñv ho patimant, va foltred-me, hini hor bugel hag hini va flac'h-a-gambr. Ne vo ket diaes deoc'h en ur vont pe en ur zont d'ar gêr ehanañ e porzh-mor Londrez. Grit un ehan eno, dre garantez evidon. Eno e stagot ho patimant ouzh ar c'hae, neket dre he fri evel m'emañ ar c'hiz, met dre he lost, en doare ma c'hello an tri foltred bezañ gwelet gant an dud diwar an douar. Setu tout ar pezh a c'houlennan diganeoc'h. Fiziañs am eus e root din va goulenn en digoll eus ar galonad a rit din en ur vont kuit.

- Hag a rin ! eme Yann Garre.

En ur vont e beaj, e c'hourc'hemennas Yann d'e vartoloded ober un ehan e porzh Londrez. Stagot e voe al lestr ouzh ar c'hae, evel m'he devoa goulennet ar briñsez.

Hogen Roue ha Rouanez Bro-Saoz o devoa ur jardin vras hag a oa al leurenn anezhi a-us d'ar c'hae, hag alese e c'hellent gwelout an holl vatimantoù o tont er porzh pe o vont er-maez.

- Hola ! eme ar Roue d'ar Rouanez un deiz bennak diouz ar beure, ne welit ket ar vatimant a zo o paouez dont-tre er porzh-mor ?

- Eo ! eme ar Rouanez, met perak e c'houlennit se ?
- Ne welit ket emañ he lost e-lec'h ma tefe bezañ he fri ?

- Eo ! laouen !

- Ur c'haer a c'henaoueg ez eo hep mar ebet, an hini a zo mestr warni. Diskennomp diwar al leurenn-mañ. Emañ o vont d'e gaout raktal. Ne vo ket lavaret ez eus bet lezet stagañ ur vatimant ouzh va c'hae, e Londrez, en un doare diskiant ! »

Ar Roue a oa droug spontus ennañ.

- Piv eo ar c'habiten genaouek a zo mestr war ar vatimant-mañ ? emezañ, pa voe tost d'ar « Barbaika ».

- Yann Garre a vez graet anezhañ, a respontas ar mous. Met mar demaoch e-sell da gomz outañ e vanko deoc'h en em ziskouez sevenoc'h, rak kizidik ez eo an Aotrou ».

E-pad m'edont o-daou o komz, edo ar Rouanez o sellout ouzh ar poltredu livet war lost ar vatimant; derec'hel a rae da sellout outo, souezhet-bras. Hag hi da ober ur sachadenn war vañch he gwaz :

- E-lec'h taerñ evel-se, emezi, sellit eta ouzh an tri foltred-se. Daoust ha ne lavarfed ket ez eo hemañ poltre hor merc'h, hag egile hini he flac'h-a-gambr ? Met n'emañ ket evit kompren petra eo ar bugel a zo etrezo o-div. Souezhus e kavan an holl draoù-se. Goulennit eta gant komzoù seven digant ar c'habiten petra ez eo se. Mar konnarit avat, ne glevimp netra. C'hwit' oar a-walc'h, pa vez droug ennoc'h, ne rit nemet troioù diskiant ».

D'an ampoent edo Yann o paouez dont war ar pont :

- Mar plij, Aotrou Kabiten, eme ar Roue en ur ziwiskañ e dog, ha kontant e vefec'h, mar plij, da lavarout din dre benaos hoc'h eus bet an tri foltred-se ?

- Feiz ! Me am boa lakaet ober anezho.
- Met piv eo an dud-se neuze ?
- Homañ eo va fried dirak Doue, honnezh eo he flac'h-a-gambr, ar bugel avat am eus an enor, a gav din, da vezañ tad dezhañ.
- Penaos ? homañ eo ho pried ? eme ar Rouanez. En em vriataomp neuze, rak va mab-kaer ez oc'h.
- Pokit din ivez, eme ar Roue.
- Fedamdousig ! eme Yann. N'edon ket o soñjal em boa tud e kêr-Londrez ! »

Pokat a reas d'ar Rouanez ha d'ar Roue koulskoude. Neuze e tanevellas dezho penaos en doa prenet o merc'h digant ul laer-mor, ha penaos e oa deuet da vezañ e bried.

- Mat eo an traoù, eme ar Roue, peogwir ez eo bev hor merc'h. Abaoe daou vloaz zo e oamp e-kanvou dre ma soñje deomp e oa marv.

Ac'hanta ! va mab-kaer, ret e vo deoc'h chom ur pennad ganeomp, abalamour deomp d'en em anavezout gwelloc'h. Dont a reot d'am falez da lojañ. An eil gabiten a gemero penn ar vatimant en ho lec'h. Em c'harg-me e vo pourveziñ d'ho martoloded kement o deus ezhomme.

- Mat eo ! » eme Yann Garre.

Hag eñ war-lerc'h e dud-kaer d'ar palez. E-pad daou viz e renas ur vuhez disoursi eno . . . Fellout a reas d'ar Roue ivez ober dezhañ mont da welout e holl rouantelezh. Ha n'eo ket war o zreid ez ejont, evel just !

Un deiz bennak oc'h erruout en ur vourc'h vras e weljont tud 'leizh ar ruioù :

- Petra 'zo erru gant an dud-se ? a c'houlennas Yann Garre.
- Mont a rejont betek kreiz ar bobl. Ma weljont un dra fromus. Daou zen bras ha kreñv a oa krog pep hini en unan eus dive'har un den marv d'hen ruzañ war an douar.

Skeiñ a rae penn an den marv war ar pavez ken e sone ! Hag ar bobl a daole pri ha fank gantañ a-grabanadoù :

- E petore bro emaoimp-ni eta ? a youc'has Yann Garre gant ur vouezh evel un tarz-h-kurun. Evel-se an hini a respeter an dud vrav, dre amañ ? »

Unan eus ar re a oa o stlejañ ar c'horf marv a respontas dezhañ :

- Hemañ n'en devoa ket paet e zleoù a-raok mervel. Setu perak e reomp dezhañ an traoù-mañ. Evel-se ez eus bet graet dre amañ a-viskoazh hag a vo graet da viken. An dleourien fall a zo evel al louzoù-fall : n'eo ket a-walc'h dezho mervel, ret eo diwall na vije o skouer evel had louzoù-fall. Ar pezh a welit n'eo netra. P'hor bo sachet an den-mañ betek ar vengleuz a zo du-hont, e troc'himp anezhañ a-dammoù munut evel kig-pastez, hag e stlapimp an tamm-mou-se a bep tu abalamour dezho da vezañ debret gant al loened gouez hag al laboused fall.

- E Breizh-Izel, a c'hroz-molas Yann Garre, ez eo c'hwi an hini a vije lakaet a-dammoù evel-se . . . Pegement a zle a zo chomet war-lerc'h ar paour-kaezh den-se ?

- Kant lur.

- Ac'hanta ! dalit ar c'hant lur-se ! Ha bremañ, ha din-me e vo e gorf da vihanañ ?

- Ya ! ya ! Ha grit gantañ ar pezh a gerot.

- Neuze e rin interin anezhañ gant kalz a don, abalamour da ziskouez deoc'h-hu, Saozon, penaos e ra ar Vretoned d'an dud varv »

Chomet e oa ar Roue eno hep lavarout grik ; ne grede ket ober netra gant aon da feukañ e sujidi, ha dreist-holl gant aon da zisplijout d'e vab-kaer.

Yann a lakaas ober un interamant gaer gant an hini marv, hervez gizioù ar vro, hag a baeas ar frejoù. Neuze e c'houlennas digant ar bikerien-vein akuitañ eus ar vro ; ober ur bez eus ar c'haerañ, ha skrivañ warnañ anv an den marv hag e hini.

Nec'het e oa ar Roue un tamm ; hag eñ ha lavarout da Yann :

- Marteze bremañ e c'hellfemp distreiñ da Londrez ?

- Añ feiz ! ya a-walc'h, a respontas Yann Garre. Goude ar pezh am eus gwelet amañ, n'em eus ket c'hoant kaer da vont pelloc'h.

Hag i neuze war o c'hiz. Pa voent erru e Londrez, e tisklerias Yann d'e dud-kaer e kave hir an amzer, rak pell a oa n'en devoa ket gwelet e wreg. Hast en devoa ivez da advont war ar « BARBAIKA ».

- Mont a reot, eme ar Roue, met neket war ar vatimant he deus ho tegaset amañ. Bezit soñj ez oc'h mab-kaer din. Ne zere ket ouzh mab-kaer Roue Bro-Saoz beajiñ war ur vatimant tri c'hant tonell, evel ur c'habiten frikerien-granked. Ez an da reiñ urzh d'am skouadrennad-listri d'en em lakaat prest. En ho servij e vo penn-da-benn, hag an amiral e-unan ne vo evidoc'h nemet ur martolod e-keñver e gabiten ».

Met evit Yann Garre holl vatimantoù roue Bro-Saoz gant amiral pe hep amiral, ne dalvezent ket ar « Barbaika ». Koulaskoude gant aon d'ober poan-spered d'e dad-kaer ha d'e vamm-gaer, ez eas war vatimant an amiral. Allaz ! kerse a vije gantañ da vat, goude.

E batimant an amiral e oa evel sturier, ur pezh Yuzev, un den kaer a-walc'h, met ne dalvezent ket ul liard toull. En deiz kentañ eus o beaj, diouzh an noz, e voe souezhet a-walc'h Yann Garre o welout an holl vatimantoù all o lañsañ war e hini ; ha koulaskoude ar vatimant e-lec'h ma oa, a oa unan gaer ha paramantet-disnar !

- Arsa ! emezañ d'ar Yuzev, droug ennañ, perak e chomomp-ni war-lerc'h evel-se ? Ne vank seurt ebet koulaskoude d'ar vatimant da vont buan war-raok. Ur sturier fall ne doc'h ken !

- Ne don ket ur sturier fall, eus nan on ! eme ar Yuzev. Met penaos sturiant pa n'emañ ket ar stur en e lec'h ?

- Pemzek deiz prizon a reot, eme Yann, rak ar stur a oa en e lec'h p'hon eus kuitaet ar porzh.

- Deuit amañ da welout, mar plij, eme ar Yuzev.

- Hag ez an, eme Yann.

Met p'edo o plegañ e benn da sellout, setu ar Yuzev o tapout krog en e dreid, ha ploup ha Yann a-benn-bouell er mor.

- Forzh va buhez ! Forzh va buhez ! a. grias ar paour-kaezh kabiten.

Met allaz ! ret e oa dezhañ ober e soñj da vervel. Rust e oa ar mor ; ruihet-diruihet e veze Yann hanter-veuzet gant an taolioù-mor. Ken buan en devoa ar Yuzev graet e daol, ma n'en devoa den ebet taolet pled e oa kollet mab-kaer ar Roue. A-hend-all e vije bet gwall-nec'het an Amiral e-unan o klask hen tennañ eus an dour. Feuket a-walc'h e oa dija o vezañ ma renke sentiñ ouzh un tamm kabiten breton evel Yann.

Derc'hel a reas ar vatimant eta gant he hent evel pa ne vije bet mann ebet.

- Ret eo din mervel », eme Yann outañ e-unan, ha da c'hortoz bezañ beuzet e lavaras ur bedennig verr . . . Just d'ar mare-se e voe savet uhel gant ur pezh gwagenn. Ober a eure ur sell war ar mor bras tro-war-dro dezhañ, trist e galon evel an dud o vont da vezañ lonket gant ar mor. Ha setu ma welas o tont d'e gaout evel skeud un den o vale war an dour. Hag an den ha lavarout dezhañ gant douster :

- Arabat dit bezañ glac'haret, va Yannig kaezh ! Ma' z eus treitourien e-mesk an dud, 'z eus re all ivez hag a zalc'h soñj.

- Penaos, eme Yann, ne vijen ket glac'haret ? Ne welin mui va maeronez, na va gwreg, na va mab ! Prometet em boa dezho en ur gimidiñ diouto e vije homañ va beaj diwezhañ. Ne oa ket o soñjal lavarout ken mat-se.

- Kemer kalon 'ta ! Deuet on d'az saveteiñ ».

Hag an den burzhudus oc'h astenn e zorn da Yann Garre :

- Sav war va c'hein, emezañ.

Ha Yann da ober. Adkregiñ a reas an den da vale adarre war ar mor ; bale a rae en toull etre daou darzh-mor, evel ur paizant etre daou denn-douar. Dougen a reas evel-se Yann Garre betek un enezenn leun a rec'hell, met glas ha na oa anavezet gant kabiten ebet. Hen diskenn a reas d'an douar e-skeud ur wezenn-balmez :

- Kae aze, va c'hamarad, emezañ. Gwellañ ac'h eus da ober bremañ ez eo sec'hañ da silhad. Sell ! tomm eo an heol ; a-benn un eur pe tiv amañ, ne vo mui neudenn c'hleb ebet warnout, ha diskuizhet e vi un tamm.

- Evel ma kerot, eme Yann.

Ar baleer-mor ne voe ket gwelet ken ha Yann Garre chomet e-unan dindan ar bodoù-palmez uhel hejet gant un avelig flour, ne zaleas ket da venel kousket. Lezomp anezhañ da gousket.

E-pad ar c'heit-se e rede batimantoù Roue Bro-Saoz, digor-bras o gouelioù ganto, war-zu aodoù Breizh-Izel. Dre ma tostaent, e kreske nec'hamant an Amiral : Petra a lavarje d'ar Brifsez ? Penaos diskleriañ dezhi ar c'heloù-fall ? Bez'e vez momedoù start da dremen zoken evit un amiral a-wechoù. Ne oa ket poaniet an Amiral dre ma oa kollet Yann, met despied en devoa o vezañ ma rankje diskleriañ ar c'heloù. Evit ar Yuzev avat, daoust ma seblante glac'haret, e oa stadennañ ken e oa !

Pa voe erru ar vatimant en aod, e voe savet ar banniel du. Ar Briñsez hag a oa o vale war ar maez gant he bugel war goubl he brec'h, a welas ar bern gwernioù ha deleziou-se heñvel ouzh ur c'hoad, hag ivez ar bannieloù-kañv o hejañ en avel e beg ar gwernioù. Kouezhañ a reas d'an daoulin o welout eno ur seblant fall. Gwelout a reas an Amiral o tont d'he c'haout, e dog gantañ en e zorn :

- Priñsez ! emezañ.
- Ne dalv ket ar boan deoc'h lavarout hiroc'h, emezi. Marv eo Yann Garre, 'keta ?
- Ya ! allaz ! evel ma livirit, Priñsez !
- Distroit d'ar vro ma'z oc'h deuet, emezi.
- Distreiñ hepzoc'h ?
- Dirak ar mor bras e ran al le-mañ hag a lavarot d'am zad : Touiñ a ran da zistroin ket da Vro-Saoz ken na vin marv hag unanet dre ar marv gant Yann Garre »

En abardaez-se end-eeun e skoe an Amiral war-du ar mor don.

Met ar Yuzev avat, a oa tec'het kuit . . . Da serr-noz, pa oa aet al listri en tu-hont da roudenn c'hlas an dremwel, e c'houlenne ar Yuzev digor e maner Kerdeñval e-lec'h m'edo maeronez Yann Garre hag e wrag o chom. O c'haout a reas an eil e divrec'h eben :

- Va digarezit, emezañ diwar an treuzoù; me ha me hepken a oar penaos ez eo bet marvet an hini a leñvit dezhañ. Gwelet em eus an Amiral o teurel anezhañ dreist al listenn »

En em lakaat a reas da ouelañ, ha ken glac'haret e seblante bezañ ma en em gavas konfortet an div blac'h gant ar garantez a ziskoueze kaout e-keñver Yann :

- Tostañ d'an tan » emezo.

Kontañ a reas dezho e oa tec'het kuit dre na felle ket dezhañ chom da vevañ dindan un den ken fall hag an Amiral . . . Kement ha ken bihan a reas ma c'ho-nezas grasoù-mat ar vaeronez hag an intañvez, ha ma voe pedet da chom da lojañ en ti. Ne gollas ket e amzer eno. War-bouez komz ha derc'hel da gomz gant karantez ha glac'h ar diwar-benn Yann Garre, e teuas a-benn da c'honit kalon ar Briñsez kaezh. Homañ hen lezas d'he daremprediñ hag a asantas ad-dimeziñ dezhañ. N'he doa ket ankounac'haet Yann Garre, pell ac'hano ! Met kaout a rae ganti e tiskoueze e oa fidel d'he gwaz kentañ oc'h addimeziñ d'un den ha na rae nemet her meuliñ. Gonezet e voe ivez kalon ar vaeronez gant ar Yuzev fallakr-se. Hi a voe da gentañ oc'h aliañ ar Briñsez da zimeziñ dezhañ. Lakaet e voe deiz an eured. Ne oa ken da ober nemet prientiñ an traoù.

- Ac'hanta ! Yann, ha sec'h eo da zilhac'h ? » a c'houlenne digant Yann Garre, un deiz bennak diouzh ar beure, an Den burzhodus.

Gant poan e tigoras Yann Garre ul lagad da gentañ, hag egile goude :

- Fidedoullig ! emezañ, kousket mat am eus »

Klask a reas mont en e goazez; ne voe ket evit hen ober; derc'hel a rae e benn da gouezhañ :

- Petra a zo erru ganin ? emezañ.
- Feiz ! kresket o deus da vlev ha da varv kement abaoe ma'z out gourvezet aze, m'o deus graet gwizioù en douar.
- Ya 'vat ! gwir eo ! Penaos eo en em gavet an taol-se ganin ? eme Yann.
- Dre ma'z eus erru daou vloaz abaoe m'emaout o kousket, a respontas an den estren, ken sioul ha tra.
- Daou vloaz ? n'eo ket posibl ?
- Daou vloaz deiz evit deiz. Moarvat ez out erru diskuizh a-benn bremañ !
- Ya ! a gav din ! eme Yann

- Feiz ! ret-mat eo dit bezañ sampar, rak n'eo ket echu da boanioù c'hoazh. Sav adarre war va divskoaz ma'z aimp en hent adarre ».

An eil o tougen egile e treuzjont ar mor hag a oa goloet a vrumenn. Tri deiz ha teir noz e kerzhas an Den burzhodus war an dour. En deiz e talc'he eon gwenn da sevel a-us d'an dour en e raok da verkañ an hent dezhañ, hag en noz, ur steredenn an hini a veze. An deirvet nozvezh e lavaras da Yann Garre :

- Anaout a rez an douar-se ?
- Ya ! rak eno ez on bet ganet, eme Yann Garre.
- N'ac'h eus ket ezhomm ac'hano ken, eme an Den burzhodus. Amañ e krog an traezh. Na zale ket. Kae war-eeun da vaner Kerdeñval. Eno e kavi da wrag o vont da addimeziñ d'ar Yuzev az taolas er-maez gwechall. Arabat dit troc'hañ da vlev na da varv. Goulenn bezañ degemeret evel mevel d'ober n'eus forzh petore labour. Gouzout a ran emeur o klask un den d'ober skirioù. Gal-lout a ri kinnig ober al labour-se . . . Ha bremañ, kent da lezel da glask da chañs, lavar din, Yann Garre, ha droed am bo, mar bez goulennet ouzhin, da respont em eus bet rentet servij dit ?
- Ya ! gwir ac'h eus d'hen embann e pep lec'h; ha me diouzh va zu, ne vankin ket d'hen ober.
- Benniget ra vezi evit ar gomz-se ! Rak digeriñ a ra dirazon dor ar baradoz. Me eo an den marv az poa paet e zle evitañ, hag az poa lakaet ober gantañ obidoù kaer. Deuet e oan-me, d'am zro, da vezañ dleour ez keñver. Roet ac'h eus kuitañs din. Salvet on bremañ. Beaj vat dit, Yann, ha bennozh Doue dit.
- Din-me eo da drugarekaat ! eme Yann Garre . . .

Met ne oa mui netra war an draezhenn, nemetañ e-unan, hag e skeud merket spis war an traezh gant sklerijenn al loar . . .

D'en em gaout buanoc'h a se e Kerdeñval e kemeras un hent treuz. Serret e oa c'hoazh dor ar maner. Ret e voe dezhañ azezañ war dreuzoù an ti da c'hortoz an deiz da sevel, hag ar mitizhien da zont er-maez eus o gwele :

- Va digarezit, emezañ neuze; un den a volonteaz vat ez on. Kontant ez on da ober un tamm mat a labour evit tamm bihan a vara »

Ouzh e vaeronez an hini e komze evel-se. hec'h anavezout mat a rae, hogen hi ne oa ket evit e anavezout gant e vlev a-istreibil war e chouk ha gant e varv en em lede war e vruched. A-hend-all e oa aet fall gweled an hini gozh da heul an oad, hag ivez dre n'he doa ket paouezet da ouelañ war Yann Garre a soñje ganti e oa marv.

- Deuit en ti, va den mat, emezi. Ha gouzout a rit draiñ koad ?
- Gwelout a reot diouzh al labour a rin.
- Debit da gentañ ur skudellad-soub, ha neuze ez eot d'ar c'hoad a zo du-hont ouzh kostez ar menez. Kaout a reot eno gwech diskaret. Ober a reot skirioù ganto, rak emberr e vo kontradet va filhorez, hag e karfen ho pefe faoutet koad a-walc'h evit an tantad a vo graet a-raok ar gouel.
- Bezit fiziañs ennon-me, ho servijer, emezañ; kontant e viot anezhañ.
- Ha Yann Garre da lonkañ e skudellad, ha war-raok etrezek ar c'hoad. Pa oa aet kuit, e lavaras ar vaeronez kozh :
- Diouzh e varv hir, e tle bezañ un ermit hag a fell dezhañ evit ober pinjenn mont eus an eil ti d'egile da glask labour »
- A-du ganti e voe ar re all.

Bemdeiz, etre kreisteiz ha peder eur, ez ae plac'h-a-gambr ar Briñsez da vale Yannig vihan. Peuvulañ e kase anezhañ war ar maez e-lec'h ma kave ar bugel pi-jadur e-leizh o sellout ouzh ar baotred o labourat. En deiz-se e lavaras ar plac'h-

a-gambr da Yannig :  
- Ez an d'ober dit gwelout un ermit kaer hag a vez o faoutiñ koad da c'honit ar baradoz ».

Mont a rejont eta d'ar c'hoad e-lec'h ne golle ket Yann e amzer, rak eus a bell e klevet trouz e vouc'hal o sankañ er c'hefiou-gwez. Kerkent ha m'en em gavas dirak an hini a selled evel un ermit, e chomas ar bugel da sellout pizh outañ. Ha goude sellout pizh evel-se, e lavaras gant ur vouezh sioul hag un aer seder :

- Poanial start a rit, va zad ! Ober a rit hoc'h-unan kement ha labour ha devezhout war un dro.

- Petra a lavarez ! Ta, va faotrig ? - N'eo ket me eo da dad.

- Arabat deoc'h komz evel-se, eme ar bugel, ar re all ne quzont ket, met a oar ervat.

Ma en em lakaas Yann Garre da c'hoarzhiniñ.

- Sellit ! eme ar bugel, bez'hoc'h eus war ho jod un toullig evel m'am eus. Hen gwelout spis a ran, daoust d'ho parvenn !

Ar plac'h-a-gambr, e-pad an diviz-se, n'he doa lavaret netra, nemet e oa bet het gant komzoù diwezhañ ar bugel :

- Mammig ! eme Yann vihan oc'h erruout er c'hastell, mammig ! Gwelet eus va zad.

- Allaz ! va mabig bihan, tremien daou vloaz 'zo ez eo marv da dad.

- Va zad n'eo ket marv, emezañ. Gallout a rit krediñ ac'hanon, pa lavaras deoc'h ez eo bev-mat !

- Me lavarfe a-walc'h kement-se ivez, eme ar plac'h-a-gambr »  
Kontañ a reas d'he mestrez ar pezh a oa bet tremenet er forest. Strafulhet e

voe ar Brînzez. Karout a rae bepred he Yann, met aon he doa, ken he doa, na oa kement-se holl netra ken nemet tromplézon. Hag hi da vont da gaout ar vaeronez da gomz ganti :

- Lavaromp bepred d'an ermit dont, eme ar vaeronez.

Lavaret e voe da Yann dont d'ar c'hastell. Pa erruas e oa dour war e zaoulagad :

- Perak e ouelit eta ? a voe goulennet digantañ.

- Gant ar joa eo e ouelan. Gwir a leverer, pa leverer ez eo war vuzelloù ar vugale-en deus an Aotrou Doue lakaet ar gwellañ furnez ».

Neuze e tisplegas e droioù penn-da-benn hep lezel netra a-gostez, na fallagriez ar Yuzev, nag anaoudegezh ha madelezh an den marv. Redek a reas ar plac'h-a-gambr betek ar vouc'h nesañ da glask ur barver hag ur perukenner . . . Nebeut goude bezañ tremenet etre o daouarn, e teue Yann Garre heñvel ouzh ar pezh a oa daou vloaz kentoc'h. Neuze e voe graet dezhañ gwalc'hiñ e gorf a-bezh; gwisket e voe dezhañ e zilhad-eured a oa bet miret gant evezh, gant e wreg, er pres, e memor anezhañ.

Evel just, ne ouie ket ar Yuzev seurt ebet eus ar pezh a dremene. Er porzh edo oc'h eveshaat ouzh ar re a oa oc'h aozañ an tantad; reiñ a rae e urzhioù da bep hini, reut an tamm anezhañ evel un den c'hwezhet dre m'eo deuet a-benn eus e daol, hag ouzh en em ziskouez evel pa vije mestr an ti dija.

Derc'hel a rae ar gweturioù da erruout leun-chouk a gerent nesañ pe a gerent pell. Ar Yuzev o degemere holl dre ma tegouezhent, pres warnañ hag hegaratmeurbet. Edo ivez eno archerien ar c'hanton; pedet e oant bet evit derc'hel an urzh vat, met dreist-holl evit keraat an eured a oa da vezañ graet en deiz war-lerc'h.

A-greiz pep kreiz e voe gwelet ar Brînzez o tiskenn. Kas a reas ar brigadier a-gostez hag e silas ur gerig bennak en e skouarn.

- Mat eo, a respontas mestr an archerien. Hag e c'hourc'hemennas c'hwezhañ an tan en tantad. Hag e savas ar flammoù sklaer en ur strakal . . . Neuze e voe gwelet Yann Garre o tont, krog e dorn e vab, hag e vaeronez war e lerc'h. Ma vanas an holl sebedennet-mik. Aet e oa ar Yuzev glas evel un delienn-gaol. Daou archer a dapas krog en e chupenn hag hen darc'hasas e-kreiz an tan. Deviñ a reas evel un alumetezenn.

Ne gollas ar gouvid seurt ebet evit se. E-lec'h un eured e voe un adeured. E-lec'h ur pred-friko e voe ugent. E-pad eizh deiz ez eas ar ber en-dro, e voe toullet barrikennoù, e tebras an dud, evañ, ha pa veze goull o c'hof ec'h adkrogent da zebrif. Den ebet eta ne voe droug ennañ war zigarez m'en devoa ar mestr adkavet e wreg hag e vadoù, nemet marteze ar Yuzev, met hennezh n'eo bet biskoazh deuet en-dro da glemm. Eus tantad Kerdeñval ez eo bet aet moarvat da dan an ifern, e-lec'h ma talc'ho da leskiñ, evel m'hon eus esper, da virviken.

Sañj hoc'h eus penaos ar Brînzez he devoa touet na zistroje biken da Vro-Saoz nemet goude ma vije deuet ar marv d'hec'h adunanif gant Yann Garre. Yann Garre avat, a gavas gantañ e oa deuet an taol da wir, peogwir e oa dre berzh un den marv en devoa adkavet e wreg. Eveltañ e lavaras ar vaeronez . . . Hag i holl war-raok en ur vatimant, da Vro-Saoz. Met o vezañ ma varvas Roue Bro-Saoz hag ar Rouanez, nebeut goude, e teuas Yann Garre en-dro gant e wreg hag e vaeronez d' o c'hastell, da Vreizh-Izel, hag eno e vejjont eürus. Gras deoc'h da vezañ ken eürus hag i, met gant nebeutoc'h a drubuilhoù.

*Kontet gant Liza Beleg, kemenerez  
Porzh-Gwenn cf Anatol ar Braz paj. 213-31  
Marvailhoù an Ankoù.*

## TRI ANV-LEC'H. Plouezoc'h, Kalorgwenn, Bulien

**PLOUEZOC'H** : Gwechall eus Eskopti Treger, bremañ eus Eskopti Kemper ha Lehon, kanton Lanneur. Patron ar barrez : Sant-Stefan.

Largillière ( Les Saints dans l'organisation de l'Armorique ) a lavare e oa diaes-tre goude peseurt anv a oa stag ouzh ar ger PLOU ( Parrez, Pobl ), e meur a lec'h : « Diaesoc'h », « zañ », eget an anvioù e Lann -, Tre, dre ma kaver an anvioù-mañ e meur a lec'h.

Patronez kentañ PLOUZELAMBR, PLUFUR, PLOUARED, PLOUREC'H ( Plouezoc'h ) ne gaver o anv nemet ur wech; ha mar deo bet savet ar parrezioù-se ganto, e vefe tu da « Plouezoc'h » e oa al labour sevel ur barrez bennak, ul labour hir o kemerout buhez un den war hec'h. Merkomp, en ur dremen ez eo iskis a-walc'h anv PLOUARED, e Latin : PLEBS BARBATA ( Dielloù Prosez Santelezhadur St Erwan, de la Borderie, paj. 62, 231, 251, 253, 272 ) mar bije PLEBS BARBATI, neuze c'hoazh. Plebs Barbata a seblant kuzhat ul lesanv bennak. Parrez Varvet ( harvet ) setu holl petra a dalvez an anv-se, hervez al latin.

Evit pezh a sell ouzh PLOUZELAMBR, hon eus diskouezet e oa ur skritur faos evit PLOUSELEV ( cf BARR-HEOL, niv. 65, paj. 41, SELEV o tont diwar SALAMO; gant ar c'hemmadur S-Z e-kreiz ar ger. Evit PLOUREC'H, sellout ouzh Barr-Heol, niv 73. Gwelomp bremañ PLOUEZOC'H.

Souezhus a-walc'h gwelout n'eo ket dindan baeroniezh Sant Per emañ ar barrez, met dindan baeroniezh Sant Stefan. Kaout a reer un delwenn eus Sant Per, unan gozh, en iliz-parrez, ha neuze, delwennoù kozh eus Sant Pêr ha Sant-Paol, e chapel Sant Erwan.

Furnioù kozh ar barrez a zo PLEBEHEZAC ( 1330 ) ha PLOUEZOC'H, e dibenn ar XV-et kantved. Kompren neuze : PLOU- ( H ) EZOC'H, parrez ( H ) Ezoc'h. O vezañ ma oa eus ar Z - se er Grenn-amzer en anv, e rankomp lenn anezhañ : TH ( dous ) pe DD. Ha lenn \* PLOUEDDOC'H.

Ne welan nemet ur ger da dostaat, ar ger Kembraek HEDDWCH : peoc'h, stouler. PLOUEZOC'H : Parrez ar Peoc'h, ar Sioulder.

Ne c'heller ket mont da heul J. Loth hag en devoa klasket tostaat PLOUEZOC'H ouzh an anv kembraek SOCH : Soc'h, a gaver en Abersoch. Disheñvel an S diouzh ar Z ( DD ) ha disheñvel ivez ar pouez-mouezh : Aber'soc'h, Plou'ezoc'h. Diaes eo tennañ muioc'h eus an anv-se. Neuze n'eo ket un anv-den ? Daoust ha ret-mat eo e vefe ? Met diouzh ret e c'heller fed sellout HEZOC'H evel lesanv un den sioul ha peoc'hus. Un anv brav ez eo n'eus forzh penaos : « Parrez ar Sioulder, Parrez ar Peoc'h ».

Evit bezañ klok koulakoude, e rankomp menegiñ an anv KERDEVEZOC'H, e Parrez Kluden, anv da rannañ e Kêr-TEVEZOC'H. Mar deo ar memes anv, ez eo diaes-tre neuze displegañ perak e kaver ar V etre TE ( : gerig - mormounañ ) hag EZOC'H.

**KALORGWENN** : Parrez vihan ( 500 bennak a dud ) eus kichen Dinan ( pe Dinan, mar deo gwell ganeoc'h ) e kanton Eyrann. An anv kozh a oa e 1187 : CARORGUEN, ha stag e oa ouzh abati Lehon. Dre un emdroadur naturel hag a vaver stank skouerioù anezhañ e

pep yezh, hag e brezhoneg, na petra ! ez eo deuet an R da vezañ L, en deiz a hiziv : cf Daerou, Daeloù ...

Un anv-den ez eo hag a c'heller rannañ evel-hen : CAROR ha GWENN.

Ar ger gwenn o talvezout eürus, gwennidik, santel, chañsus. An anv kentañ KAROR a zo da dostaat ouzh ar c'hembraeg kozh CAEROR : difenner - kêr, diwaller-kêr, keodedour. An diftongennAE, n'he gweler ket en anv ar barrez vreizhat, met arabat disoñjal e kaved en XII-et kantved KAER ha KAR ha darn eus ar stummoù-se a zo bev bepred en anvioù-tiegezh KARGARADEG, tra ma'z eo deuet an anvioù-kêriadennoù da vezañ KERGARADEG. Troomp neuze : Difennour Eürus, Santel.

**BULIEN-BUHULIEN**, kanton Lannuon, stag bremañ ouzh kêr Lannuon, abaoe 1961. Patronez ar barrez : Santez Marc'harid Antioquia. E gwirionez ar stumm BULIEN a zo ur stumm faos, peogwir ez eo ber : an U hag e vefe gwelloc'h skrivañ neuze BULLIEN.

Nemet e kaver BULIANIZ evel anv tud ar barrez; gant un U hir. E meur a barrez diwar-dro Lannuon e klevet ur dra bennak evel-hen : **Bulian**. Kavet e vez war ar paperoù kozh an daou stumm BUHULIEN ha BULLIEN. Ar barrez evel parrez n'eo ket eus ar re goshañ : war-dro ar bloaz 1524 e oa bet savet da renk a barrez; betek neuze e veze diservijet gant Tadoù Kabañsuned eus Lannuon ( Kouent Kervaria-an-Draoù ). Kaout a reer c'hoazh en iliz-parrez ur prenestr eus ar XIV-et kantved, ha neuze div waregig hag un nor eus fin ar XV-et kantved, bet miret eus an iliz kozh, pa oa bet savet an iliz a zo bremañ, e 1840. Ur chapel all, kouezhet en he foull : Sant Mark, a oa eus an XIII-et kantved hag e servije homañ evit tud karter Sant-Mark.

Parrez Bulien he deus bet ar chañs dispar da virout hec'h anv kozh. Setu da vihanañ ar pezh am eus c'hoant da brouñ deoc'h ! Un anv koshoc'h zoken eget diskenn ar Vretoned en Arvorig.

Menegomp da gentañ ur marvailh bravik hag a vez klevet ar re gozh o kentañ. Ur bloavezh bennak e oa bet sec'hour spontus er vro, hag e varve ar vugale vihan dre ziouser laezh. Setu m'eo em gavas un ermit yaouank, ne ouie den ebet eus a helec'h e teue, na piv e oa, hag a oa gantañ ur vuoc'h mat da reiñ laezh, hag evel-se e voe laezh da reiñ d'ar vugale, ha saveteet e oa bet o buhez ... Dre fent e lavarer e oa un dra bennak evel Juluen anv an ermit-se ha setu perak e talvezfe BUHULIEN : Buc'h Juluen. Hogen ur marvailh evit ar vugale an hini eo, evit kuzhat outo ar pezh a vez diegi bepred o tizolein dezho : orin ar vuhez.

Rak Santez Marc'harid eo a zo Patronez ar barrez ha patronez an iliz-parrez, hag ar Santez Marc'harid-se a vez pedet ( pa a veze kentoc'h, rak ne glevet mui komz a gement-se, e Bulien da vihanañ, en deiz a hiziv ) pedet gant ar mammoù evit kaout laezh a-walc'h da vagañ o bugale. E lec'h all, estreget e Bulien, e vez pedet Santez Marc'harid evit-se. E Lanrodeg, da skouer, e-kichen Gwengamp ez eus ur chapel da Santez Marc'harid hag e tsu - pe da vihanañ e teue - mammoù eus ar vro ha zoken eus kostez Kintin da bediñ d'ar chapel-se evit kaout ar c'hras da gaout bugale gser, hag ivez laezh a-walc'h d'o magañ ... Un nebeut bloavezhioù zo en em gavas estonet merour an atant nesañ d'ar chapel, hag a oa o plañnaat porzh e véreuri, o kaout ur pezh maen ront. Galvet e voa an Aotrou Erwan Bellaign eus Gwengamp, un ispisialour war ar Ragistor ha ne voe ket pell oc'h anaout er maen-se ur Maen Fallik, unan eus ar vein-se hag a veze graet lidoù en-dro dezho en enor d'ar Frouezhusted. Mein Fallik evel-se a zo bet kavet e Landeda, el lec'h anvet SANTEZ MARC'HARID. Tu ebet da nac'h : kristeniet ez eus bet un devozion bagan, ha lakaet ar gristenien da bediñ ha da enoriñ ar Santez vrudet, ar Verzherez Veur, gouez d'ar C'hresianed ( Megale Martus ). Bremañ e welimp kement-se a dostoc'h ...

Ha Bulien ? Ne chom mui nemet ar feunteun hag a zo hep mar ebet abaoe milvedoù o tarzhañ e traoñ : « Grav Santez Marc'harid » pe « Grav ar Bourk », mar kavet gwel. N'eus MAEN ebet, ha n'eo ket souezhus : plantet e rank bezañ, envel ma leverer e Treger, da la-

varmat eo, kuzhet don en douar, en un tu bennak, evit herzel ouzh ar gristenien da heuliañ gizioù pagan. Ha d'hor meno ez eo BULIEN anv gwirion al lec'h m'emañ ar Feunteun. E lec'h all, evel e Lanrodeg hag e Landeda - hep komz eus lec'hioù all - ez eo deuet a-benn anv Santez-Marc'harid, da drec'hiñ war an anv kozh, ha kollet eo bet hemañ da viken. E Bulien, avat, ez eo bet disheñvel an traoù, daoust ma'z eo deuet Santez Marc'harid da vezañ Patronez an iliz-parrez. Met setu : ne oa tu ebet da sevel ar chapel gentañ e-tal ar Feunteun, dre ma oa homañ en ur flagenn c'hleb : teir pe beder gwazh-dour vihan o kejañ eno. Ret e oa sevel ar chapel gristen gentañ, uheloc'h-krec'h, e beg ar c'hrao, war ar plas e-lec'h m'emañ an iliz. Ha daoust ma vez graet Feunteun Santez Marc'harid eus ar Feunteun, ez eo chomet an anv kozh; treuzvevet en deus, hag an anv kentañ a oa BULIEN, hag a verke da gentañ penn LEC'H AR FEUNTEUN.

Met n'eo ket a-walc'h lavarout, ret eo prouñ, na petra'ta ! Ha n'eo ket eus an aezzañ sur-mat, dreist-holl, dre n'hon eus ket a zielloù kozh. Koulskoude gant ar marvailhoù gontet diwar-benn an Ermit kozh, diwar-benn al Laezh, ha dreist-holl diwar skouer Lanrodeg ha Landeda, ez eus tu da ginnig un diskleriadur bennak, daoust ma chomo marvailhoù traoù diaes da lakaat war o rez.

Kinnig a reomp eta rannañ ar ger BUHULIEN-BULIEN e teir rann : ar rann gentañ BU ( H ), an eil L ( E ) hag an deirvet IEN, a studiump a bep eil.

Ar rann gentañ eta : BU ( H ). Marvailh an dud kozh a c'hellfe ober dimp soñjal er ger BUOC'H, dreist-holl pa'z eo stag ar ger LAEZH ouzh Dour ar Feunteun. Nemet ez eo kate eeunoc'h, d'hor meno, gwelout er marvailh-se traoù o kuzhat ouzh ar vugale, gwir implij an Dour-se, evit pezh a sell ouzh al Laezh. Aes-tre e oa c'hoari gant ar ger BU ( H ), n'e garr ket deoc'h ? Setu perak e welomp er ger BU ( H ) ar wrizienn eus ar ger BUHEZ. Teñval ez eo n'eus forzh penaos orin ar ger BUHEZ, ha kar e seblant bezañ d'ar ger BUOC'H, homañ sellet evel ul loen sakr o terc'hel buhez an dud dre bourchas kig ha laezh dezho. Daoust ha n'eo ket ac'hano ez eo deuet an doujañs o deus Indeziz ouzh ar « buoc'henned » ?

An eil rann a ve'e eta L ( E ) pe marteze ( E ) L. Amañ ec'h adkavomp ar gudenn bet diluziet ( pe da vihanañ a zo bet klasket he diluziañ war niverenn 73 Barr-Heol a-zivout orin anv ar barrez PLOULEC'H - PLOUREC'H ). Mar lenner EL e c'heller soñjal er ger brezhonek ELLOU ( skilfoù ur c'hilhog pe ur yar ) ha tostata e-keñver ster ar ger modern : men-krog, da lavarout eo, ar vein-se hag a ra d'an alar sac'hañ en ur park meinok. EL ( l ) o verkañ neuze stumm ar MAEN.

An deirvet rann : IEN a seblant bezañ diaesoc'h eget ne deo e gwirionez. Ar ger IEN a c'hellfe donet eus ar ger GENOS ( : ganet, genidik ) hag hor befe neuze un dra bennak evel-hen : \* BUHELGENOS, \* BULEGENOS da vezañ komprenet MAEN o REIÑ AR VUHEZ. Met neuze petra en dije bet DOUR ar Feunteun d'ober aze ?

Setu perak e kinnigfemp kentoc'h IEN : EIEN ( mammenn, mammenoù ). Hag e teu splann-tre an anv : BU ( H ) L ( E ) EIEN : Mammenn ha Maen ar Vuhez. Hag ar ger e-unan oc'h emdreñ en daou stumm \* BUH ( u ) LEIEN, \* BU ( H ) LEIEN hag o tonet da vezañ BUHULIEN pe BULIEN ( Bullen ).

Ar pezh a zo sklaer, mar deo gwir hon diskleriadur, n'eo ket gant ar Vretoned eo bet roet an anv-se. Ar Vretoned o tiskenn en Arvorig war-dro ar V-et pe VI-et kantved a oa kristenien. E-touez Arvorigiz, e oa mesk-ha-mesk kristenien-un toullad-ha neuze tud chomet fidel d'o relijion bagan. Diegi o dije bet kristenien o krouñ ur seurt anv : MAMMENN HA MAEN AR VUHEZ, dreist-holl pa oa an anv-se un anv pagan-rik, anv ul lec'h ma veze ennañ graet lidoù difennet gant al Lezenn gristen.

Santez Marc'harid. An devoision da Santez Marc'harid a oa en he brud wellañ, e Roma, war-dro ar Vet kantved, ha tamm-ha-tamm e oa en em ledet ar vrud-se etrezek ar C'huzh-Heol; ha pa voe divizet groñs gant pennoù-an-iliz echuiñ gant Relijion ar Vein, en Arvorig, da heul Sened an Naoned, e 658, ha « plantañ », interin ar vein bagan, e voe klasket un diskoulm evit BULIEN : interin ar Maen, bennigañ ar Feunteun ha lavarout d'ar mammoù pediñ hiviziken Santez Marc'harid. Neuze e c'heller krediñ e stagas an dud da bediñ Santez Marc'harid, war-dro ar bloavezhioù-se, da gentañ, en-dro d'ar Feunteun, ha goude-se neuze, e voe savet uheloc'h-krec'h ur Chapel en hec'h enor. Diaes ez eo merkañ amzerioù resis.

Nemet e klot pep tra da ziskouez ez eus bet graet war-dro ar VI-et hag ar VII-et kantved e Breizh, ul labour divent evit diazezañ ar Vro ha peurgristenin ar Vretoned.

KLERG.

Setu perak e oa bet klasket kristenañ al lec'h-se dre lakaat anezhañ dindan baeroniezh

## IWERZHON HAG AR C'HENVARC'HAD

**Notenn :** D'ar 16 a viz Mae 1972, ar gelaouenn bemdeziek LE MONDE eus Pariz, he deus gouestlet he fajennad 13 en he fezh, da guennoù Iwerzhon o tonet d'he zro e Kumuniezh.

Ekonomikel Europa. E-kreiz ar bajenn edo poltred an Aotroù LYNCH, pennvistr Iwerzhon, an hini en deus kaset ar gemennadurezh-mañ, goude an hollguzuliadeg vroadel ( pe referendum ) a c'houlenne digant Iwerzhoniz pe edont a-du evit monet er Gumuniezh, pe n'edont ket. Setu amañ da gentañ ar gemennadurezh-se, ha pelloc'h ar bruderezh graet gant kostezenn ar gouarnamant :

1

### KEMENN PENNVINISTR IWERZHON, AN AO. LYNCH

Dre he respont, d'an dek a viz Mae diwezhañ, d'an hollguzuliadeg vroadel, ez eus em ziskleriet Pobl Iwerzhon a-du gant un Europa brasoc'h hag unvanoc'h.

Daoust hag e c'hellan-me lavarout e voe an diviz-se evit ur vro vihan evel hon hini hag a zo ouzhpenn un enezenn, un diskoulm meur, un diskoulm kalonek ? Ne voe ket avat, un diskoulm dic'horzot, peogwir e klot gant ar spered embreger a entan hor pobl abaoe meur a remziad. Lorc'h enno gant ar pezh o deus kaset da benn war dachenn an arboellerezh, e venn bremañ Iwerzhoniz derc'hel o flas e Kumuniezh vras Europa Nevez.

Krediñ a reomp hon eus un dra bennak da zegas d'an embregerezh kaer-se, ha sur-mat un dra bennak da c'honit. Pezh a laka hor c'halon da dridal eo e tuio Iwerzhon da vezañ er Gumuniezh Ekonomikel Europat Ledanaet ( K.E.L ) un diazez dibar evit ijinerzhoù nevez o labourat evit ar marc'hadoù europat.

Abaoe dek vloaz, hag ouzhpenn, hon eus graet hor seizh gwellañ evit ma teufe Iwerzhon da vezañ un diazez asur ha gonidus evit an engouestladiuriou-arc'hant en ijinerzh. Taolet hon eus evezh evit ma chomfe yac'h hor moneiz-ni en doare da wareziñ an eskemm dishual eus an arc'hant hag eus ar gonidoù etre ar broadoù. Savet hon eus ur framm eus ar gwellañ evit an ijinerzh. Gant an deskadurezh hag ar gelennadurezh roet en hor skolioù hon eus stummet un niver bras-meurbet a labourerien yaouank akuit ha prest da c'hoari war n'eus forzh peseurt tachann.

A-drugarez d'ar skoazelloù-arc'hant roet ganti, ez eo deuet Iwerzhon da vezañ en Europa ur vro eus an dedennusañ evit an uzinerien da zegas enni ijinerzhoù.

Hor Burev evit kas war-raok an ijinerzh ( IDA Iwerzhon ) en deus skoazellet tremen 460 kompagnunezh estren d'en em ziazezañ amañ ha da broduiñ marc'hadurezh.

Ar gwañ nevez-se en deus talvezet kalz da reiñ lañs d'hor micherioù ha da lakaat da vleuniañ hon ekonomiezh. Dek vloaz' zo e oamp ur vro labour-douar. En deiz a hiziv, daoust ma' z

eo aet kalz war-raok al labour-douar ganimp, ez omp ur vro-ijinerzh.

Evel ezel eus ar Gumuniezh Europat Ledanaet, e c'hellomp reiñ d'an ijinerzhoù estren kaeroc'h chañsoù c'hoazh. Gwelloc'h e vo c'hoazh hor-stabiledad hag hor galloudegezh, ha dedennusoc'h hor skoazell.

Ar c'hevredigezhioù oc'h engouestlañ arc'hant en Iwerzhon evit kas o marc'hadurezhioù d'an diavaez a gavo digor dirazo ur marc'had a 250 milion a brenerien, ha diskarg e vint a daihoù. Ar gwir o devo da gaout yalc'hadoù ha na vint ket dister, hag e vo o gonidoù kuit a druajoù e-pad 15 vloavezh.

E nep lec'h ebet, en Europa, e diabarzh ar Gumuniezh Europat Ledanaet, ne gaver ur strollad-reolennadurioù a-seurt gant hor re-ni.

Ar gouarnamantoù hag o deus renet Iwerzhon, an eil war-lerc'h egile, abaoe 20 vloaz' zo hag ouzhpenn, o deus bet roet ar plas kentañ da gement a c'helle dedennañ ar postadurioù-arc'hant en ijinerzh.

Kendalc'het e vo gant ar politikerezh-se : skiant-prenañ an uzinerien estren, an arc'hant vak ha kement a c'hell degas gonidoù nevez, a gavo bepred du-mañ ar skoazell vrasañ hag an degemer kalonekañ.

Sinet : John LYNCH.

E traon bajenn LE MONDE e kaver chomlec'hioù an I.D.A., e Dulenn, Londrez, Nevez-York, Sant-Fransisko, Chikago, Koln, hag evel just, Pariz.

A - RAOK AN HOLLGUZULIADeg PE REFERENDUM KINNIGET DA IWERZHONIZ  
Bruderezh gant kostezenn ar gouarnamant :  
A - ziw ar 10 a viz Mae e vo cheñchet ar vuhez amañ da viken.

### MA VOTEZ YA

evit mont en EUROPA, e c'hoarvezo kement-mañ : Bez'e vimp en ur strollad bras a vroadoù e-lec'h bezañ un enezenn vihan pell.

Par e vo hor mouezh da vouezhioù hor c'hentizil . . .  
Bez' o devo hor micherourien ur gopr reizh evit o labour, hag hon ijinerzh ur marc'had brasoc'h hag arc'hant di gant ar G.E.L. d'o harpañ. Gwelloc'h prizioù a gavo hor labourerien-douar war ur marc'had bepred digor dezho.

Ingalet e vo ar gonidoù hag ez aio war uhelaat evit pep hini ar stad a-vuhez, keñver-ha-keñver gant hini ar re all.

Labour a vo evit an holl hag e vo brasoc'h ha gwelloc'h ar servijoù kevredigezhel a bep seurt.  
Mont a ray an dizimplij war goaz-

### MA VOTEZ NANN

neuze en em gaffe amañ cheñchamantoù eus ar gwashañ : koll a rafemp kalz war an ermaeziañ-marc'hadurezh, koll a rafemp ivez plasoù, hag e kollfe hor merourien arc'hant.

Koll a rafemp marc'had Breizh-Veur a gasomp dezhi 70 % eus ar pezh a ermaeziomp.  
Koll a rafemp gwerzh war vare'hadoù all Europa.

Dilabour spontus a zeufe da heul, hep na c'helltemp herzel outañ.  
Abalamour d'ar marc'hadoù kolllet e vefe ret dimp biharaat an arc'hant a ouestlomp da wellaat ar vuhez, ha d'an oberoù kevredigezhel, elec'h hen kreskiñ evel e broioù ar G.E.L.

Ne c'hellfe ket ar vicherourien dilabour kaout implij, ha ne vefe ket bras a-walc'h an digolloù roet d'an dud dilabour evit bevañ o ziegzhioù.

Ne vefe ket a c'houlennoù da frouezh hol labour-

hañ, hag ar goprou a yelo buan war greskiñ, evel ma reont e pep Stad-Ezel - ha kement-se div wech ha teir gwech buanoc'h eget na reont bremañ e Breizh-Veur hag en Iwerzhon - Barrek e vimp da reiñ gwelloc'h kelennadurezh d'hor bugale o devez gwelloc'h buhez amañ eget an hini a c'hellfent kaout dre hor stri-voù deomp-ni hon-unan.

EMAN EUROPA O KINNIG  
KENLABOUR HA KENEILDED  
DEOMP ! NE C'HELLOMP KET  
TREIN KEIN DEZHI !

rien-douar ha war zisteraat ez afe ar vuhez war ar maezioù.

DAOUST HA NE C'HELLFEMP KET CHOM  
EVEL M'EMAOMP ?

Ne c'hellomp e stumm ebet ! Ret eo mont e-barzh pe chom er-maez. Ne c'hellomp ket dibab un hent-etre.

Ne rafemp emglevioù-kenwerzh nemet gant broioù, ha n'emañ ket o ekonomiezh diazezet war ar labour-douar; pe c'hoazh gant broioù a brodu mardourezhioù ha na broduer ket er G.E.L. Ha ni en diavaez eus ar Gumuniezh, ne gemer ket homañ frouezh an douar a broduomp-ni.

VOTIÑ YA ! a zo mouezhiañ evit hon interest hag hervez ar furez.

VOTIÑ NANN ! a zo mouezhiañ evit nebeutoc'h a ermaeziadoù-marc'hadourezh, hag evit nebeutoc'h a labour.

Kan seun-se emañ an traoù. N'eus hent ebet etrezo. Ne c'hellomp ket chom evel m'emaomp.

LAVAR YA ! >>>

( Embannet gant FIANNA FAIL e Inniu, 5 a viz Mae 1972 )

Troidigezh : L. Andouard.

## Un oferenn war vor e Bro-Dreger

*Deuet eo an noz, teñval eo an amzer; n'eus den war vale adalek beg Millo betek enezenn Vriad o vont dreist bourk Perroz ha kêr Landreger. Ne glexer ket anken en oabl, a-zioc'h ar penn, kan klemmus ar c'hefeleg-aod, na kaked skiltrus ar mor-big marellet. Ne glexer a-bell, dreist an inizi, nemet grozmol ar mor bras a groz euit lavaret ez a atav en-dro hag ez eo bepred leun a nerzh. A-vec'h ur steredenn en em zispak ur wech an amzer euit distkouez e pelec'h emañ ti an Aotrou Doue.*

*En un taol-kont, etre unnek eur hag hanter-noz, e klexer, e-kreiz ar mor, ur c'hloc'h o seniñ; dont a ra a-gostez enezenn Vriad, kêr Bempoull pe Landreger, hag e son a ya a-hed an aod. Chom a ra pennadoù, evel da ehanañ, dirak ar Porzh-Gwenn, e parrez Perwenan, dirak an Treou, Trelevren ha dirak al Lenn e parrez Louaneg. Tremen a ra Perroz, hag ez a dreist beg ar C'hastell hag ar Sklerjenn war-zu Trebeurden, ha n'on dare da belec'h, en ur seniñ atav ur wech an amzer hag o chom ur pennadig dirak pep kêriad-tiez.*

*Taolioù ar c'hloc'h-se, e-kreiz an noz, a oa evel klemmoù an anson da glevet; klemmoù ar vartoloded beuzet o tont da c'houlenn pedennoù digant o zud.*

*A-benn ur pennad e klevet dirak bourk ha lenn-vor Perroz, a-rez enezenn Rouzig, a-gleiz pe a-zehou, hervez ma c'hwezhe an avel, ur c'hloc'h all pe ar memes hini marteze, ne oufen her lavaret deoc'h, o seniñ adarre, mes bremañ ne ra ket er memes tra. Kentoc'h ne sone nemet taol bremañ, taol e-orr, zoken dirak ar c'hérioù ma chome evel da ehanañ dirazo, ha bremañ e sko stank e doolioù, betek c'hwec'h pe seizh taol diouzhtu, an eil war-lerc'h egile. A-barzh nebeut, eus al lec'h ma sone an taolioù-se, e weled o sevel eus a-rez ar mor betek tregont pe zaou-ugent troatad en aer, ur c'houlouenn vras, pe euit lavaret gwell, ur voull-dan, hag a lugerne en ur dreiñ hag en ur zistreiñ a bep tu, a-gleiz hag a-zehou, atav war-zu an douar, evel p'he deufe c'hoant da furc'hañ kement toull kuzh a oa er c'herreg a vir ouzh ar mor don da zont war an douar bras. Ar sklerjenn-se ne bade ket pell; mont a rae kuit, ha prest goude ar c'hloc'h a sone adarre ha neuze ne glevet nemet son ar c'hloc'h e-kreiz trouz ar biliennoù a ruihe hag a ziruilhe diwar an eil roc'h war eben.*

*Goude-se e weled adarre o sevel en aer hag o tiskenn her buan, ur c'houlouenn vras ha pa veze aet ar sklerjenn kuit, ar c'hloc'h a sone adarre. Teir pe beder gwech e c'hoarvezte an dra-se : sklerjenn ar c'houlouenn ha son ar c'hloc'h pep hini d'e dro. A-benn un eur, pe war-dro, ar c'hloc'h a yae da eut hag ar sklerjenn da netra.*

*Neuze e weled o tispakañ a bep korn a oa en aod hag o listgañ diouzh*

an douar bras, bagoù karget a wazed, a vere'hed hag a vugale zoken-c'hoant  
deskiñ abred ar vugale da garout Doue o doa hon tadoù kozh. Mont a raent  
da glevet an oferenn a lavare evito, e-kreiz ar mor, pa n'o ket evit en ober war  
an douar bras, ur beleg kalonek chomet en o zouez evit silvidigezh o eneoù.  
Dont a rae bagoù a bep horn ar vro, adalek stêr Landreger betek beg Trebeurden.  
Dont a rae dreist-holl eus a Bloumanac'h, rak e Ploumanac'h ez en em denne  
kristenien vat an douar bras n'oant ket evit kemerout bag e Pont-Gweneg.

Tud Perroz n'oant ket evit dont war-eeun eus ar gêr rak ul lastez sou  
darded, anvet gwardoù-an-aod, leun a feiz fall, a fallgriez hag a drubardere  
deuet di, war o meno, evit difenn ar vro a-enep ar Saozon, ha na raent nemet  
laerezh hag en em vezviñ, o devefe buan o diskulhet hag o c'haset d'ar mare

War an deiz, tud Perroz a rae van da vont da besketa pe da vezhina,  
atau evit kaout tro da lezel o bagoù pe e Trestraon pe e Treztrignel, ez en em  
gavent a-enep ar mare pa zeuent en-dro.

Diouzh an noz, e-pad ma veze gwardoù-an-aod oc'h evañ banneoù pe  
astennet en tu pe du oc'h uzañ ar banneoù o deveze evet, ez aent sioul eus o  
ziez, evit mont pep hini gant e dud, da gaout e vag. Sevel a raent enni ha mor  
a raent, er memes amzer gant Ploumanac'hiz hag ar re all war-zu enezenn Rouzig  
d'al lec'h ma oa gwelet ar sklerijenn.

Eno e kavent ur vag pontet, brasoc'h kalz eget o hini. War-zu ar vag vras  
se e teue bagoù eus a gement porzh-mor bihan a oa en aod. Teurel a raent o eor  
en-dro dezhi, evit chom en he c'hichen; ar re vichañ en em stage outi.

War bont ar vag vras ez eus savet gant lien-gouel, evel pa lavarfen deoc'h,  
un tiig bihan. E-kreiz ez eus un daol goloet gant lien gwenn-kann, hag e pep  
penn ur c'houlaoenn-goar war-elum. Kerkent e weler ur beleg o wiskañ e zilh  
da oferennañ . . .

An holl a sav o daoulagad . . . Vad a ra da galon an holl gwelet ur wech  
c'hoazh unan eus o beleien, marteze eo evit ar wech diwezhañ. Stwazh ! den  
n'her goar, rak an amzer a zo diasur. Ur martolod kozh, duet e zremm gant heol  
ar broioù tomm, a zo en e gichen. Ar beleg a ra sin ar Groaz evit kregiñ an ofe  
renn; ar martolod kozh a son e gloc'h bihan; an holl a zo daoulinet en o bagoù,  
dizoio o fenn, tro ouzh ar vag vras. Kerkent ha ma lavar ar beleg ar c'homzoù  
kentañ-mañ eus an oferenn : Introibo ad altare Dei, kant ha kant mouezh all  
a sav d'udius ha kalonek war-zu, an neñv en ur ganañ kantik an oferenn a ganed  
er mareoù-se :

Ofromp da Zoue ar sakrifiz  
Na zo netra a gen kaer priz . . .

Ar bagoù a horjelle hag a vranškelle, a save hag a ziskenne, pe hini d'he  
zro gant ar gwagennoù. Lod a rae van da vont d'ar goueled, lod all a bigne war  
gern ar c'houlaoenn-mor; a-wechoù div vag, harp-ouzh-harp, n'en em welent ket  
zoken ha koulskoude ar c'han hag an diskant a yae a-unan, pep hini d'e boent,  
rak a galon e kane an holl, ha ker brav ez aent, evel pa vefent bet en iliz Sant-  
Jakez e Perroz.

Digorit ho halon ker bras ha ma kerot, savit ho spered uhelañ ma c'hel-  
lot ha laurit din ha c'hwit hoc'h eus klevet ur c'han ken dudius, gwelet un dra  
ker burzhudus ?

D'ar gorreoù, pa sav ar beleg en aer, evit o reiñ da adoriñ d'ar bobl, korf  
ha gwad Hon Salver Jezuz-Krist, an holl a stou hag a bleg o fenn, daoulinet,  
strinket d'an douar war blenken o bag, doujañs ha karantez Doue en o c'halon . . .  
Daoulinet int etre ar mor bras a ya hag a zeu a-zindan o zreid ha toenn kourou-  
lek an neñv a guzh anezho ouzh daoulagad ar sitoianed . . .

Ur gomz dievezh hepken a vefe bet a-walc'h evit lakaat martoloded ar  
Republik pe ar c'hozh gwardoù-an-aod da zont da enezenn Rouzig, da lammat  
war ar gristenien vat ha d'o strinkañ e goueled ar mor. Ne vefe ket bet diaes,  
rak ne oa den war-eezh.

Nann, tud kozh Perroz n'int ket tud aonik : feiz don a oa en o c'halon  
na fiziout a raent e Doue holl-c'halloudek. Ra zeuio o bugale hag o bugale vihan  
da vale war o roudoù.

Echu an oferenn; met a-raok mont an eil diouzh egile, a-raok en em zis-  
partiañ, an dud kalonek a gan c'hoazh ar c'hantik-mañ evit trugarekaat Doue eus  
o vadelezhoù en o c'heñver : Meulomp Doue hep eur . . .

A-barzh an deiz, pep hini a zo distro d'ar gêr; n'eus nemet ar beleg paour  
he oar da belec'h mont, rak n'en deus kêr ebet. En ur ziskenn eus e vag e ranko  
klevet e pe du emañ ar c'hask dezhañ evit gellout mont en tu all, el lec'h ma  
ne vezo ket klasket. N'eus forzh, n'eo ket kalz nec'het gant kement-se, rak ar  
pezh a rank da ober hiziv a ranke da ober dec'h :

Ur belek katolik a zo un evn gwenn avat;  
Hiziv ' mañ el laneg, warc'hoazh e vo er c'hoad;  
Disul en un neizh-pik, dilun en un neizh-bran,  
Hag el lec'h ma tebr lein, ne zebr nep tro e goan.

( Tennet eus EMGANN KERGIDU gant Lan INIZAN  
hag adskrivet gant Y. an D. )

## SKRIVAN LIZHERI

Roparz Hemon a lavare e oa arabat distrujan tamm skrid brezhonek ebet, zoken ar re a so blante didalvoud, ha setu perak e tegouezhe da dud evel Kerlann ( Doue d'e bardono ! ) klenkañ skridoù brezhonek en ur voestig evit o c'huzhat e faoutoù mogerioù an'tiez, gant an esper e vefent adkavet ur wech bennak ha ma talvezfent evel-se da skrivañ lstor ar Yezh.

Ma ! d'ar mare m'emañ ar pellgomz o c'honit tachenn hag oc'h ober d'al lizheroù koazhañ, e vefe mat d'ar Vretoned teurel muioc'h a evezh eget biskoazh ouzh al lizheroù, a eskemmont kenetrezo. E pep hini anezho ez eus tra pe dra da bennaouiñ e-keñver lstor ar Yezh hag an Emsav, nemet ez eo risklet an anaoudegezh-se da vont da get, peogwir ne vez ket taolet evezh a-walc'h da virout ar skridoù-se.

Evit ma vefe aesoc'h mirout al lizheroù ha ma vefent talvoudus evit an amzer-dazont, ez eus ezhomm da heuliañ un nebeut reolennoù :

1 - E-touez ar skridoù risklet da vont da goll da gentañ, emañ ar c'hartennoù-post. Ur c'hiz vat eo, pa vezer o veajiñ, skrivañ ur ger d'ar vignoned war gein ur gartenn-bost, warni taolennoù pe boltredoù eus ar vro e-lec'h ma vezer o touristañ. A-wechoù e vez warno doareoù prizius diwar-benn tud ha traoù, nemet evit renkañ ar c'hartennoù-se hag o mirout ez eus ezhomm boestoù; anez e vezint stlabezet hag ezaouet aes-meurbet. Arabat ankouazh sinañ en un doare spis ar c'hartennoù-se.

2 - Bez' ez eus un dra hag a ankounac'haer merkañ alies : an deiziad. Merkañ atav neuze an deiziad hag al lec'h ma vez bet skrivet al lizher. Nag a lizheri o vont en o hent hep na deiziad na chomlec'h ar c'haser. Evel just, war an taol, n'eus ket ezhomm. Met a-benn daou pe un miz goude, ha dreist-holl uaou pe dri bloaz goude...

3 - Evit pezh a sell ouzh al lizheri, ar gwellañ da ober ez eo implijañ follennoù-paper ment 21 X 27, pe 22 X 29, hervez ar muzulioù nevez. Ha goude merkañ an deiziad hag al lec'h ma skrifer, merkañ a-berzh piv e teu ar skrid ha da biv e kaser anezhañ. merkañ ivez an abeg eus al lizher. Setu amañ ur skouer da sklaeraat ar pezh a fell dimp lavarout :

Roazhon, 10 a viz Mae 1972

a-berzh E. Simon, 23 st-raed Milin  
35 ROAZHON  
da Bêr MORVAN, Ker - Uhel  
22 MAEL - KARAEZ.

kudenn : Roll ar C'helaouennoù  
brezhonek

4 - Fall-tre ez eo skrivañ war an daou du eus ar follinier. Skrivañ hepken war un tu eus ar follenn, dres evel ar pennadoù-skrid a aozer evit ar moulañ. Aesoc'h, evel just, ober gant ur follenn hepken skrivet war an daou du. Koulskoude, pa vez traoù a-bouez ez eo kalz gwelloc'h

skrivañ war un tu hepken, gant merkañ sifr ar bajenn, na petra' ta' hag an deiziad adarre, diouzh ret. Ur c'honferañser, ur prezeger, ne skrivont ket o c'haezeadenn pe o frezegenn war an daou du eus o faperoù : war un tu hepken, ne lavaran ket.

5 - Kalz a dud a zo techet da implijañ ar pezh a c'heller eñvel : an alezioù, da lavarout eo, bevennoù ar follennoù, ha skrivañ a-dreuz. An nebeutañ ar gwellañ, se' zo sklaer !

6 - Gallout a reer skrivañ pe gant an dorn, pe gant ur mekanik-da-skrivañ. N'eus ket ezhomm da lavarout ez eo ar skrivañ gant ur mekanik ar stumm gwellañ-holl, rak a-wechoù e vez diaes lenn ar skritur-dorn. Betek un toullad bloavezhioù 'zo e veze dizoare implijañ ar mekanik evit skrivañ da dud e familh pe d'e vignoned, bremañ avat, ne reer ket nemeur a van.

7 - Ret eo mirout an adskrid, pe an doubl, eus al lizheroù. Kaout neuze paper karbonek evit-se. Gallout a reer evel-se adskrivañ e lizher, div pe deir gwech, hep koll amzer, dreist-holl ma'z implijer paper tanav a-walc'h, ha ma skrifer gant ur mekanik-da-skrivañ. Zoken ma skrifer gant an dorn, arabat disoñjal lakaat ur follenn garbonek etre div follenn : kalz disteroc'h e vo an adskrid eget gant ar skriverezh, met n'eus forzh, gwelloc'h ez eo en em gemerout evel-se, pa ne vez ket tu d'ober a-hend-all, eget lezel al lizher da vont en e hent, hep mirout an doubl anezhañ.

8 - Evel ma'z eus bet lavaret ergentaoù diwar-benn ar c'hartennoù-post, ret eo sinañ e lizher. Zoken mar ne vez ket lennapl ! Met c'hoazh ur wech, bezit soñj da verkañ fraezh ha sklaer ho chomlec'h war ho lizher, ha n'eo ket hepken war golo al lizher. Zoken, mar kav deoc'h, ez eo anavezet mat ho chomlec'h gant ho kenskrifer : hemañ a zic'hañs dezhañ koll amzer a-wechoù o sellout ouzh e fichennoù da adkaout ho chomlec'h. Espernit amzer an dud, se' zo ur stumm da vezañ seven, ne gav ket deoc'h ?

Traoù dister, a leverot. Marteze ! Traoù boutin anavezet-mat, a leverot c'hoazh. Aze, tudañ, e fazit da vat ! rak, siwazh ! kalz a vrezhonegerien ne heuliont ket ar reolennoù elfennel-se !

skrivañ war un tu hepken, gant merkañ sifr ar bajenn, na petra' ta' hag an deiziad adarre,

## BARZHONEGOU

### PERAK ?

« Damant ebet n'o deus da gout  
Ar re-se a vale war baveziou ker.  
Damant ebet da lazhañ na da c'hloazañ  
Boudoù bihan bev fiñvus pe difiñv . . .  
A ! Na damant em bez me da bep kammed  
Damant da flastrañ, da frikañ  
A-hed ar wenodenn pe dreuz ar park  
Boudoùgou uvel dindan sol va zroad !  
: Ar c'hwil glas souchet er spoue,  
Ar verionenn vunut o treinañ  
Gant mil boan ha mil ijin  
Ar verr-blouzenn d'he c'hrugull.  
Bleuhvigoù koantik damguzhet el leton  
O strivañ da zigeriñ o c'halon d'an Heol -  
Seblantout ra din klevout o c'hlemm :  
- Perak' ta, Aotrou, n'hoc'h eus ket roet  
Divaskell d'an Den ?  
A ! Na ponner eo warnomp pouez e droad !

6 - 6 - 72

A. D.

### MERC'H AR MOR

gant Evnig penn-ar-c'hoad.

Mar karez azezañ, Janig, war ar skabell  
A zo aze dindan mantell ar siminal,  
Me a zisplego d'it ur pennad-danevell  
A zo bet desket d'in gant da vamm-gozh, gwechall !  
Darn a lavar eo gwir ! Hervez lod all n'eo ket,  
Met bezet-e - vezo ur gentel' zo enni,  
Hag e talvez bezañ mizet eñvor outi.  
Setu : En un ti bras war ribl ar mor savet,  
E veve nhec'h unan ur vaquez koant-meurbet !  
Yaouank' oa da welout. Kouskoud, hini' bet  
Eus hec'h amezeien ne c'helle gouzout reizh  
Bloaz he ganedigezh. Kenvroiz gouizieki  
Wer istor hon tud kozh hag holl zarvoudoù Breizh,

28

A skriv e oa Priñsez a lignez keitiek,  
Harluet diouzh he Bro gant soudarded estren,  
Ha goude, war ul lestr, bezañ treuzet ar mor,  
Deuet betek hor Breizh da glask pœc'h ha goudor !

Kaer-kenañ' oa eta, gant he blev-hir melen,  
He dremm liv ar yec'hed warni, daoulagad glas,  
Leun a zouster; hag ar pezh a zo gwelloc'h c'hoazh,  
Kalon aour, ene glan hag ivez spered fur.  
Gant seurt donezonoù ne vanke, a-dra-sur,  
Dezhi na mignoned, na brud, na meuteudi.  
Ouzhpenn un enebour avat he doa ivez :  
Ar warizi a gar gwashañ ar garantez,  
Ha da heul ar gwinizh, askol' tegouezh mediñ !  
Kerz an hañv pa veze sioul ar mor, ar Briñsez,  
Diarc'hen hag he blev o nijal en avel,  
A rede war an traezh, mistr evel un heizez !  
Alies e pigne war lein ur roc'h uhel,  
Ha bamet ouzh splannned ar vro en-dro dezhi,  
E chome hed eurioù eno da eñvoriñ.  
Redek a rae a-dreuz d'ar gwagennoù eonus.  
Skañv ha nerzhus ha gvevn evel ur gourener.  
Eilet gant trouz ar mor, ivez gwech - an - amzer,  
E kane gwerziou kozh war donioù dudius.

' Vel ma souz ul loen-gouez, ' vit nber lamm hiroc'h,  
Ar mor sot a gilas, en deiz-se izeloc'h  
Eget en deizioù all. Hag ar Briñsezig vat  
A ziskannas ivez pelloc'h eget biskoazh.  
War ur roc'h peurviañ goloet e pignas :  
A bep tu, e tarzhe dirak he daoulagad  
Ar c'haerañ taolennou : Ahont, tu ar c'hreizteiz,  
Ur c'hloc'hdi mein-greunek kizellet gant ijin,  
Betek ar c'hoabrennoù o sevel kroaz ar feiz;  
War-du ar grec'hienn parkadoù ed ha lin;  
Brug ruz war lein ar roz; e gwalarn ur c'hoad pin;  
A-vern, hed an aodou, kerreg bras ha fentus;  
E kornog heol gouere war-nes tec'hel da guzh  
O teurel e vannou ruz-tan war ar mor glas !  
Sed ar c'hloc'h o seniñ taolioù kentañ ar c'hilaz :  
Dre-holl ez eus kaerder, dre-holl ez eus dudi.  
Hag ar Briñsez he doa, gant ar mor luskallet  
En un huñvre varzhus en am ankounac'het !  
Pa zevas Anjelus an noz d'he dihaniñ  
Ar mor en doa stignet ur c'helc'h en-dro dezhi.  
Ha neuze, mui - ouzh - mui e teuas her warnañ :  
D'ar sparfell ar goumig ne c'hellas' met plegañ !

Amañ ec'h echuo va zammig kontadenn :  
Abaoe n'eo ket bet gwelet war an draezhen  
Priñsez-veur an tornaod ! Zoken pa seblant fur,  
Ar Mor, mabig, a zo un torfedour budur !

29

*' Vel ar mor, alias, ar Bed a vez traitour :  
 Arabat selaou re, ivez, e gomzoù flour :  
 Gantañ Breizh a vezo beuzet holl dizale,  
 Ma na stourm ket gwelloc'h he gwellañ bugale !*

EVNIG « Pen - ar - C'hoad »

DAOU VARTOLOD WAR AN TORNAOD.

- Pelec'h emañ bremañ ?
- Nep lec'h ebet !
- Ez penn, peseurt menozioù ?
- E mann ! . . . pe el loar en he c'hant !
- Allaz ! div wech, allaz evidout, allaz evito !
- N'ouzon ken, n'ouzon mui.
- Sell pizh ouzh an nec'h.
- Ne welan nemet koumoul.
- Koumoulenn du, koumoulenn dall  
 Uhel a-bell o tarnijal.
- C'hwezhañ a ra an avel askellek  
 En ur strakal, en ur stlepel warnomp  
 He lienou glas blazet-sall  
 Hag he liñseliou labezet,  
 ' N ur skourjezañ an hent mac'hagnet.
- C'hwezhañ a ra en e sac'h - binioù,  
 Hag e bannieloù dibrennet Koroll an Ankoù.
- Traezh an aod a strink, a nij  
 d'ar c'helell ( 1 )
- Ar bili a ruilh e-mesk ar broenn sec'h.  
 Yudal a ra korzennoù ar palud,  
 Kribet dizehan o c'hribenn  
 Evel tonnoù keflusket ar mor . . .
- Tarzhañ a ra an arnev  
 Gant tennou-kanol ar c'hurun,  
 An oabl skarret evel ul lestr  
 Gant gwazhiennoù al luc'hed  
 a zamzigor bolz an neñv.
- Arvest spontus fin ar bed.
- Tamm ebet ! Al luc'hedenn-se  
 N'eo ' met kleze lufr Nevenoe  
 Oc'h argadiñ evel gwechall . . .  
 E mouezhioù an evel,  
 Daoust ha ne glevet ket  
 Glav ar varzhed kozh,  
 Pedenn vantrus hor gourdadou,  
 Hirvoud ar re marvet evit netra,  
 Klemman ha trid hor bro a-bezh ?

EVNIG « Penn - ar - C'hoad » .

- Klevout a ran mouezhioù  
 E-kreiz korn-boud an avelioù,  
 Hag hiboud an eneoù o tremen . . .
- Seul - vui ma kresh ar stourm,  
 Seul - vui e ro din nerzh
- Kerzhadeg o vont etrezek ar C'huzh - Heol  
 Da zivouchañ hon daoulagad  
 Da zihuniñ hor c'horf,  
 Met an oabl ? zo teltet e-du
- O huzhat antronozioù ruz ! . . .
- Riv am eus. Sklaset eo va eskern.
- Chomomp c'hoazh ur pennad  
 Ha krog gant da zorn em dorn-me . . .
- Berr a oa warnon da vat . . .  
 Bremañ en em gavan aezetoc'h.
- Gwenn ar mor ha du an oabl . . .
- Livioù hor stourm.
- Evidomp livioù pep ged.
- Gwask va dorn startoc'h.
- Gwaskañ a ran . . .
- Ha goude devezhioù teñval hor striv,  
 Koumoul gwenn, koumoul skañv  
 A zegouezho niverusoc'h - niverusañ . . .
- Ha da heul, an oabl glas divent,  
 Boull ha glan-meurbet.
- Krog mat em dorn bepred,  
 Ha lavar din : ha petra ' welez-te c'hoazh ?
- Setu ma welan o tont a-barzh nemeur  
 A-benn warc'hoazh marteze,  
 Sklerjenn hon dieubidigezh :  
 Liv ar peoc'h  
 Evit an holl  
 En diwezh . . .

Roparz BROUDIG.

( 1 ) Kelell : ar riblennad etre an tevenn hag an aod.

## KOULMIG AR GINDI

E meur a di, e-pign ouzh ar vur, e weler an daolenn hag a vez graet anezhi : « L'Angelus de Millet ». Daou zen, ur paotr hag ur plac'h a weler er penn a-raok eus an daolenn. Ar plac'h pleget he fenn ha juntret he daouarn. Ar paotr pleget e benn ha krog en e dog gant e zaouarn. Stumm ar bedenn warno. N'eo ket diaes gouzout peseurt pedenn emaint o lavarout, rak emañ an noz o tiskenn hag er serr-noz o e tamweler er pellder beg un iliz vihan; n'eo ket diaes klevout dre ar soñj ur c'hloc'h bennak o « tintal an Ave » evel ma lavar ar ganaouenn vrudet « Kousk ! Kousk ! Breiz-Izel ! ».

Bremazon e oant o daou o labourat, ur forc'h, ur baner, ur garrigell gant ur sac'h warni a ziskouez peseurt labour e oant oc'h ober. Douster, sioulder, peoc'h. Ya ! ur bed leun a beoc'h, tud sioul o labourat didrouz o-daou war un dro, an ozhac'h hag e wreg yaouank, amzer dezho e-kreiz o labour da gomz eus o labour, eus o ziegezh, eus o bugale bet pe da vezañ; amzer dezho da vezañ evurus an eil gant egile, ha neuze o eneoù tost-tost da Vestr bras an Natur ha da Vamm Santel hor Salver . . . Bremazon, ar vaouez a dapo krog er baner hag er forc'h, hag he gwaz a dapo krog e daouarn ar garrigell da glask war un dro douster ha peoc'h o menaj bihan.

Ar bed-se avat, n'eus mui anezhañ nemet e taolennoù al liverien vrudet hag e levrioù ar skrivagnerien, hag un tamm e memor ar bobl. Marv eo, evel ur bern traoù kaer hag a steue devezhioù an dud diwar ar maez. Bremañ, e plas an daou zen stouet war ar blaenenn en ur bediñ, lakit un trakteur gant un den hepken warnañ; ne glev ket an ANJELUS o tintal, ne wel ket zoken an noz o tont rak, hep gouzout dezhañ, kerkent ha ma vo erru an deñvalijenn ec'h alumo gouleier e drakteur hag e tac'ho pellañ ma c'hellò da arat gant e alar ledan, daou pe dri soc'h bras dezhi. Fraoñvadeg e drakteur he deus kemeret plas an notennoù sklintin a gouezhe evel ur bennozh eus lein an tour da heul an Anjelus-Noz. Labour, skuizhder, nec'ha-mant alies, gant ar soñj e vo ret dizleañ, adaptout an arc'hant lakaet e binvioù a bep seurt, pe implijet da vodernaat ar menaj. E-pad ar c'heit-se emañ e wreg o poanial en-dro d'an ti, d'al loened, d'ar vugale, oc'h aozañ koan. N'o devez ket mui amzer na gwaz na gwreg da vevañ asamblez ha zoken d'en em garout evel m'o devoa huñvreet e rajent, pa oant krog d'en em zaremprediñ evel danvez-priedoù . . . Ha darn evit tec'hel eus ur vuhez evel-se a zo gwelloc'h ganto, dreist-holl ar merc'hed, mont d'en em chadennañ en uzinoù, pres warno o vont d'o labour, ul labour dispered evel kanellat neud elektrik, graet en noz, e-pad 8 eur . . . Un dra bennak a zo a-dreuz er bed a-vremañ. N'eo ket ar RELIJION eo a zo klañv, met an dud gant ar Bed modern, gant al Labour nevez. N'eo ket ar Bedenn eo a zo klañv, met peoc'h ha sioulder buhez an den. N'eo ket ar Feiz eo a zo klañv, met an DEN e-unan; e-unan ha na oar mui plegañ e benn evit selaou; selaou ar VOUEZH VISTERUS-se, dous evel mouezh an Anjelus da serr-noz.

Mouezh an Doue bev hag a vez klevet hepken pa vez sioul pep tra e kalon an den hag en-dro dezhañ. Pa ouezo an den mirout ur pennad-sioulder en e vuhez ec'h adkavo DOUE !

Tennet eus Koulmig ar Gindi, 11 a viz EBREL 1971.

## ar bed nevez . . .

En daou benn eus hor parrezioù : e Sant-Elved hag e Kaouenneg, da c'hortoz troc'hañ bulien dre an hanter emañ ar mekanikoù bras o c'hoari : tourterien ( bulldozerien ), skraperien, plañerezed he me' oar. Mont a ra tud a guriotiz da welout al labourioù, hag ar journalioù emunan o deus ranket komz anezho. Evel just, ne vez ket graet heñchoù evel-se ken buan ha lavarout « chou » d'ur yar, met evelkent, ret eo gwelout an troc'h a 9 metr donder graet e beg grav Keryanneg, e Kaouenneg, evit kompren ne harz seurt ebet ouzh ar mekanikoù nevez . . .

Mekanikoù nevez. Bed Nevez. Mar deo ret toullañ heñchoù nevez, pe ledanaat an heñchoù kozh evit aezetaat tremeniri ar gweturioù hag ar c'hamionoù, piv a vefe sot a-valc'h evit lavarout e vije ret ober al labourioù-se evel gwechall gant traoù ha paliou ? Ms ver a-du gant ar bed nevez, ret eo kemer anezhañ evel m'emañ.

Piv eo an inosat a lavarfe ez eo ret d'ar baizanted leuskel a-gostez an dornerezed g'iz nevez, troñsañ o mañchoù, tapout krog en ur falz, pe en ur falc'h, ha neuze diskoachañ eus un tu bennak ar « c'hwistoù » ! . Se' vije mat marteze da sachañ touristed, evel Bretoned dic'hizet gant bragoù bras evit ur c'hermes bennak; met setu tout. DEN EBET ne vefe sot a-walc'h evit degas en-dro ar Bed-se. Gwir eo n'eus riskl ebet e teuje en-dro kennebeut. Zoken an dornañ war al leurioù gant ar vaper ! Perak neuze ne vefe ket staget neuze kezeg ouzh ur « manej » ? . N'eus forzh penaos ne vefe ket aezet-kaer, rak n'eus mui a gezeg, nemet kezeg-prizioù, pe un toullad kezeg-eal mat da reiñ ealenn bihan evit ar girezh !

Kalz eus an traoù kozh a zo mat evit ar Museum ( ar mirdi e brezhoneg mat, mar plij ), hag e meur a vro ez eus « Mirdioù » bras e-lec'h ma vez adsavet bilajennoù gant ar micherioù kozh, gant tud zoken o kas en-dro ar micherioù-se da ziskouez peseurt buhez a oa gwechall ( pe un dek pe 20 vloaz bennak hepken ! ). Un dra vat ez eo kement-se, rak ken prim ez a ar Bed en-dro gant ar mekanikoù nevez ma'z ankouar buan peseurt buhez a oa hini hon tud n'eus, koulz lavarout, nemet ur momeñ.

Ha neuze, un dra diskiant ez eo ober un troc'h etre an amzer dremenet hag ar rum-madoù nevez o tonet war an douar. Kement-se a zo diwiziennañ an den, ober ur mekanik gantañ evel ar mekanikoù hep ene a ziskar kleuzioù, a doull ar vein, a blaena mein ha douar goude.

Un den diwiziennet n'eo mui nemet un hanter loen-gouez ha n'eus evit kaout peoc'h d'outañ nemet reiñ boued dezhañ, reiñ diduamantoù dezhañ ( Sirk ar Romaned kozh, skinwel an Den Modern ). Evit ar Bed Nevez ez eus ezhomm Bretoned Nevez, ya, met, gwiziennet don en Istor o Bro, hag er Feiz a zo bet nerzh ha buhez ar Vretoned kozh. Bevet ar Bed kozh ha Bevet ivez ar Bed Nevez !

( Koulmig ar Gindi, 27 a viz Eost 1972 )

## Keginerezh e Vro-Gembre

### SOUBENN KIG MOC'H ( cawl cig moçh )

- 1 morzhed - hoc'h
- 1 l 1/2 dour
- Irvin-saoz; Panez; Ognon; Karotez; Pour; Persilh; Patatez.

Lakaat en ur gastolodenn ar c'hig hag al legumaj nemet ar persilh hag ar pour. Poazh e-pad teir eur. Lakaat ar pour hag ar persilh drailhet munut un hanteur eur a-raok servijet. An dourenn a vo servijet e-giz soubenn. Hag ar c'hig gant avaloù douar ha koaven.

### BARA BRIZH ( Bara brith ).

- 1 lur bleud
- 1 c'hartouron sukr
- 1 vi
- 350 g frouezh sec'h a bep seurt
- 1 loaiaid vihan a demz-boued ( spisoù )
- o l 45 a de-laezh

Lakaat da drempañ ar frouezh sec'h e-barzh an te-laezh e-pad an noz. Meskañ an holl draoù all a samblez. Lakaat ar vi. Meskañ mat pep tra ha lakaat en ur plad bet lakaet ennañ pe amann pe sukr. Lakaat er forn, tan izel enni ha lezel da boazhañ e-pad un eur hanter. Servijet yen e tammoù gant amann.

### GWASTELL KEMBREAT ( Pice ar y maen )

- 200 g bleud
- 115 g amann
- 115 g sukr
- 1 vi
- 1 dornand rezin Korint
- 1 briñsennad holen

Meskañ an amann hag ar bleud. Meskañ ivez an holl draoù all. Lakaat ar vi hag ober toazh sikañv. Rollit an toaz-se ha troc'hit ennañ daou gelañ. Lakaat da boazhañ war un tan izel betek ma vo poazh brav war an daou du.

### MAT DA C'HOUZOUT :

- 1 tasad = 1 / 4 litrad
- 1 loaiaid vras a vleud = 22 g
- 1 loaiaid vras a sukr = 25 g
- 1 loaiaid vihan = 7 g
- 1 tamm amann a vent ur vi = 50 g
- 1 loaiaid vras = 3 loaiaid vihan

34

## A-dreuz lenn

### 1) Pôle et Tropiques

Meur a wech e vez klevet e Breizh : « Pera: labourat evit ar brezhoneg hag embann levrioù, ken bihan eo niver ar vrezhonegerien ? »  
Dav eo mont da welout ar pezh a vez graet er broioù all.

E kelc'h gelaouenn ar visionerien *Obladed Pôle et Tropiques*, e kavomp ul benn bennak diwar-benn bro-C'hronland, ur vro staget evel rannvro ouzh Denmark, linennou-skrevet gant ur misioner eus bro an Eskimoed, er C'hanada : Bro-Chronland a zo c'hoazh un tammig Europa, met eskimoat eo dija an en-dro. Evidon, an dra souezhusañ eo klevout tro-war-dro din an eskimoeg komzet gant an darnvuiañ eus ar boblañs, dreist-holl gant ar vugale. Ha koul-skoude, o sellout outo, eo anat ez eus un nebeut anezho hepken o kaout gwad eskimoat en o gwazhied. Pegen disheñvel diouzh ur gêriadenn eus Hanternoz ar C'hanada, ma ra van ar pep brasañ eus an Eskimoed yaouank da gomz saozneg hepken, mezh dezho ober gant o yezh.

« Amañ eo klok an divyezhegezh : n'eus ket ur stal, ur melestrerezh ne vefe ket skrivet ennañ an holl skritelloù, an holl diskleriadurioù e daneg hag e grönlandeg. Er c'hroazhentoù, e-kichen ar « stop » e vez merket : Unigit.

« E levr di Godthaab e kaver kalz levrioù e grönlandeg : danevelloù, barzhonegoù, troidigezhioù diwar skrivagnerien skandinaviat hag all, evel A. Dumas, J. Verne, J. London, A. Camus e-unan ! Peardra da brederiañ d'ar re a lavar n'eo ket mat an eskimoeg da vevañ yezh lennegel pe yezh ar skolioù.

« Bro-Danmark a rank e-keñver ar skolioù e Grönland, doujañ da sevenadur ar vro, o kemeiout an eskimoeg evit ar skoliata.

« Kinniget ' zo bet din levrioù skol brav-tre. An darnvuiañ a zo skrivet e grönlandeg hag e daneg. Dre-se, e c'hell ar grönlandad yaouank deskiñ en e yezh douaroniezh e vro, hec'h istor, he ragistor. Er c'hontrol, an Eskimo desavet er C'hanada ne oar mann ebet diwar-benn e orin, e istor hag e vro.

« Ker Godthaab a zo bet gevellet gant kêr Pangnirtung e Douar-Baffin, er C'hanada. Tri bloaz ' zo e kinnige kuzul-kêr Godthaab d'un Eskimo kanadian yaouank ur yalc'had evit studiañ e skol c'hronlandad Holsteinborg. Respont ebet ! Marteze ne c'hoanta ket melestrerezh ar C'hanada e vefe gouezet gant he boblañs eskimoat e c'hellfent studiañ en o yezh.

« An Tad Linge am c'hasas gantañ un deiz da welout an ti-moulerzh e Godthaab Ober a ra moulañ eno troidigezh grönlandek buhez sant Fransez a Azis gant G. Jorgensen. An holl vicherourien kouls lavarout hag ar rener e-unan a zo eus ar vro, ha labour an ti-se a dalv labour an tiez moulerzh all. Aze e vez embannet ar gazetenn *Atuagadliutit / Grönlandposten*, unan eus ar re goshañ er bed ( ouzhpenn ur c'hantved dezhi ), ur gazetenn grönlandek ha danek ».

diwar Guy MARY-ROUSSELIÈRE O.M.I.

35

An Eskimoed eus Grönland n'eus ket 40.000 anezho.

« Kompren ha komz rannyezh ar bobl fiziet ennañ, setu ar pep pouezusañ evit ar misioner. Ha n'eus ket a levrioù. Dav eo selaou. Derc'hel da lavarout ha da gomz en desped d'ar c'hoarzerzh. Skrivañ ha skrivañ hep ehan. Kemer ur sonenroller ha selaou dreist-holl ar re gozh evit anavezout gwelloc'h ar rannyezh, o vezañ ma'z amprest ar re yaouank re a c'herioù digant ar frangleg-afrikat ».

« Ret eo kregiñ un deiz gant al labour. Biken avat ne vezo echu. Goude pemzek vloaz, ar re zesketañ a zeu kavadennoù ganto :- Al labour-se, eme an Tad Laplace, a c'houlenn un emnac'h bras hag ivez karantez ouzh an den ».

« Penaos bezañ war evezh ouzh an talvoudegezhioù sevenadurel, denel ha relijiel ma n'int ket anavezet ? Hag an dud a-raok fiziout ennoc'h ar pep douar hag ar pep priziusañ a zo enno d'o henchañ etrezek Doue a c'hortoz ma komzot not o yezh. Anez, penaos o lakaat da gendoniañ gantañ ? Penaos lodenniñ ganto bara Doue hag e lavarioù ? ».

« Ar misioner a zo ret dezhañ asantiñ bezañ tremenet da estren betek an Afrikaz ma klevo, dre m'en devo komzet hep jubennour :- Gwenn eo da groc'h en, afrikat avat, da galon ».

diwar an Tad CAREIL O.M.I.  
( Pôles et Tropiques )  
mezeven 1972.

3) Yann BREKILIEN : Vacances en Bretagne, 240 p., ill., 21,00 F.  
Nature et Bretagne, 38 rue J. d'Arc, Quimper.

Un dremmueliad ec'hon eus Breizh : douarouriezh, douaroniezh, istor, henvoazioù, buhez pemdeziek, yezh, lennegezh, arz, sonerezh, heginouriezh, danvez an dour, ar mor, an ijinerezh, ar c'henwerzh hag all ... Ur bern traoù ...

Goude m'eo bet displeget evel-se ar vro d'al lenner ha displeget e pajennoù leun a spered breizhat, a laka an estren da gompren Breizh hag he fobl, an eil rann a zispleg an traoù dre ar munud : petra 'zo da welout ha penaos en em gemer evit anavezout ar muiañ ar gwellañ eus kaerder ha boem ar maezioù, an aod, an ilizoù hag all ...

Ha ma'z eus un den hag a anavez mat traoù Breizh a gomz diwar o fenn ez eo Y. Brekilien. Ul labour talvoudus evit Breizh hag aes da lenn ha mat da brofañ.

4) Xavier GRALL : GLENMOR, ed. P. Seghers, coll. Chansons d'aujourd'hui, 17, 13, 50 F.

An dastumad Chansons d'Aujourd'hui embannet e ti Seghers a ginnig dimp en dro-mañ Glenmor, pe gentoc'h Xavier Grall eo a ginnig dimp Glenmor evit gwir !

Xavier Grall, skrivagner, kazetenner, Breizhad o komz diwar-benn e vignon. Dre-se ez eus div rann el levr : ar rann gentañ, 70 pajenn, savet gant Z. Grall a zo gouestlet da C'h- Glenmor, met ar pezh a skriv diwar-benn hemañ a zo ken-

koulz all e soñjoù dezhañ e-unan; e galon, e galon trenket ha chomet hep bezañ komprenet, e vuhez a skrivagner debret gantañ bara sec'h, e vuhez a skrivagner ha na bardon ket d'ar gevredigezh e c'hwitadennoù dezhañ e-unan, hag a youc'h e huñveoù en ur bed nevez kevredadel. N'eus forzh, bourrus eo lenn ar pajennoù-se skrivet aketus gant ur skrivagner a vicher.

Glenmor a garer pe ne garer ket ! E varzhonegoù, e ganaouennoù a gan un tammig pep tra : ar vuhez, ar garantez, ar relijion, an natur, ar vroad hag all ... Breizh hec'h-unan gant he c'hudennoù a chom atav, koulz lavarout, en eil renk en e ganaouennoù. Pardonet e vo dezhañ meur a wander, ken pinvidik ha ken itan zo lavar ar barzh.

Al levr avat a chom berr. Ur c'han a vez savet dreist-holl evit bezañ kanet hag emañ ez eo kanet gant Glenmor, ur paotr bev tost deoc'h ma'z eus unan. Pa vez lennet ur c'han e chom evel maru. Siwazh ! Dav eo ivez tremen buan e-kichen menez pe venoz e hwezhet a-ratorzh gant Glenmor da vroudañ, da hegañ ha da feukañ. Diaes eo lenn hep mousc'hoarzhin, kunijennoù ouzh ar vourc'hizien pe ar veleien a vefe atav o vanveziñ pa'z eus el levr ul luc'hskeudenn erav o tiskouez Glenmor ha Léo Ferré oc'h evañ Champagn; hep mar ebet en enor d'ar bobl baour ha d'ar broleterien ! Graet en deus brav-mat e drez er vuhez ha gwel a se evitañ. Met perak mallozhiñ gant meur a hini n'o deus ket abes peadra ken founnus all ? Lubaniñ ar bobl, setu tout ! Perak ivez lemel pep pik ha pep virgulenn ? Evit bezañ diouzh an doare a-hiziv ? Un tammig bluff 'm eus aon !

Kalz kanaouennoù a zo brav ha fromus. Met a-benn dek vloaz, a-benn ugent vloaz, pet anezho a chomo el lennegezh vrezhezh ( brezhonek pe c'hallek ) ? N'eus forzh, ul labour dalvoudus a vezo bet graet ganto evit Breizh.

J. C.

5) NOUVELLE ECOLE ( No 17, meurzh-ebrel 1972 ), Les Celtes, 10 F.  
B. P. 129 - 07, Paris 7<sup>e</sup>.

Ur gelaouenn evit an dud desket, enni hudennoù a brederouriezh, a yezhoniezh, a skiantoù istorel ha ragistorel. Pleustret e oa bet dija gant an No 15 war an Gelted. Memes tra amañ en No 17. An holl bennadoù, koulz lavarout a zo war an danvez-se : orin, yezh pe yezhoù, istor, relijion ( an drouiziezh ), deiziadur galianek Coligny gant G. Pennaod, sellboentoù liesseurt ha breutaus gant P. Lance ( an Azginivelezh heltiek ), Gelted bro-Gebeg.

Meur a bennad a dremen dreist penn al lenner-etre hag a zo bet skrivet evit tud a-vicher; koulskoude hini pe hini a chom aes da lenn hag a zo notennoù a levronezh hag an hentoù da heuliañ evit meizañ ar gwellaennoù degaset en anaoudegezh ar Gelted.

E-keñver ar spered : ar gelaouenn n'emañ ket a-du gant menozioù ha faltazioù kleizet ( gaochisted ). Setu aze un dra hag a c'houlenn un tamm kalon an deiz a-hiziv.

J. C.

Ar roll-se eus gwazhiou-dour departamant Aodoù-an-Hanternoz ( 22 ) a zo bet embannet gant Renerezh Al Labour-Douar evit an departamant-se. Daoust d'e briz uhelik ( 50,00 Lur ), diouzh e vent, e talvez ar boan e bourchas koulskoude, dre ma' z eo e gwirionez, ul levr-diazez, ennañ anvioù ar stêrioù bras ha bihan gant o adstêrioù, ar gwazhiou bras ha bihan gant o adgwazhiou, ha gant kartennoù evel just. Klasket ez eus bet zoken reiñ stummoù brezhonek d'an anvioù brezhonek : Koad, Gwaz ( : Gwazh ) h.a. Da heul ar gwazhiou-dour emañ gorread o zachennadoù, ha merket ez eo hed pep hini anezho. Ar stêrioù hag ar gwazhiou pennañ o deus un anv dezho o-unan : Douron, Ponton, Yar, Rozkoad, al Leger, ar Gindi, ar Yeodi, an Trev, al Leñv, an Ig, ar Gwaz, an Urn, ar Gwesant, ar Fremur, an Arwenon, ar Rañs ( kement ha reiñ un anv bennak ! ) dezho holl, nemet en Urn marteze, anvioù brezhonek pe geltiek.

Un dra heverk ez eo gwelout ez eus meur a wazh-dour o tougen anezho barrez. Da skouer, e Bro-Lannuon : Plistin, Pleuveur ( Bodoù ), Rospez, Koad, Gwaz, Kawan, Traougeri . . . Kit da welout avat, petore anv a ra an dud anezho. Daoust hag e klot an anv a implijont gant an hini « ofisiel » a gaver er « Repertoire » ? Rak evel ma ouzer, ar gwazhiou-dour bihan a cheñch anv alies, hervez ar c'hêriadennoù a dreuzont. Lakomp e Bulien : Gwazh-Kerboentenn ( anv ar Repertoire ), adalek ma kej ganti an div pe deir gwazhig a zeu eus kostez Kergomar pe ar C'hozh-Plas ha gwazhig Feunteun Santez Marc'harid, a vez graet anezhi betek al Leger : Gwazh - Lev . . .

Graet em eus ur sell war roll gwazhiou-dour va farrez c'henidik : Plouvael, e Breizh-Uhel, ha merzet ur fazi bennak. Lenn a reer e galleg : Saint-Sauveur-le-Bars, pa ranker lenn : Saint-Sauveur-le Bas ( Sant Salver-an-Traoñ, pe Sant Salver Izelañ d'hen disheñvelout diouzh bourc'h kozh Sant-Salver-Uhelañ ). E gwirionez, daoust d'ar « Repertoire » n'eus nemet ar rann izelañ eus ar wazh o tougen an anv-se, rak uheloc'h e kaver un anv brezhonek-mat : RIDOR, anv bet miret dre chañs, ha na gaver mui e brezhoneg komzet nemet enez Heudig ( Bro-Wened ). Ur fazi all am eus merzet ivez. Lenn a reer COETFORT e-lec'h COETFROT, da lavarout eo Koed ( Koad ) Froud, pe Koed-Fro; ar ger FRO-mañ a zo chomet da skouer e Sant-Jili-ar-Menez : FROMENE : gwazh-dour ar Menez.

Am bannerien avat, a oar a-walc'h n'eo na difazi na klok o labour, ha setu perak e c'houlennont kenlabour an dud a-youl-vat d'e glokaat ha d'e zifaziañ. Ul labour evel-se a zo ul labour talvoudus evit an douaroniourien, an arboetourien, hag ivez na petra' ta, ar yezhourien. Met talvoudusoc'h e vo c'hoazh ur wech kresket ha reizhet.

Goulenn al levr : M. Le Régisseur des Recettes de la D.D.A.

C.C.P. Rennes 9401-37, 50, 00 Lur

KLERG.

## Parabolenn ar Mab Dispigner

« YEZH AR ROC H »

( Cf Luk. XV. 11 - 31 ).

- 11 Un den en devoa daou ambrellin
- 12 An ostant minik en devoa lavaret d'e anjez :  
« Ma anjez, difoaret din pezh am eus da gaout gant ho chez ». Hag an anjez en devoa difoaret e vadoù d'e ambrellined.
- 13 Eno pe dri journe goude, an ambrellin minik en devoa mouget ar bilheoz en devoa, hag a oa difoaret war ar beoz, hag e fontas tout e vilheoz war-dro d'ar bilhezed.
- 14 M'en devoe difoaret eus e vilheoz, ec'h erruas e oa manket ar c'housaj' barzh ar vro-se, hag e oa an taouen en-dro d'e jez.
- 15 Neuze e oa deut an ambrellin da c'hwez ur rup eus ar vro-se da c'houl c'hwil; ar rup a zifoaras anezhañ da gas turgner war ar beoz.
- 16 E jez en dije karet c'housañ ar gourdajenoù war-lerc'h an turgner; ha den ne roe d'e jez.
- 17 Neuze e oa deut an ambrellin da soñjal en e spered, hag e lavaras :  
- Pegement a c'hwilerien a zo' barzh c'hwez an tiara kozh, hag o deus el-trizen grin ' pezh a c'hellont da c'housañ, ha ma jez ' zo amañ o tortañ gant ar granig.
- 18 Ma jez a zidorto hag a yelo da lavaret d'an tiara : Ma anjez, graet em eus miñsonajoù enep an neñv hag enep d'ho chez.
- 19 Ma jez ne verit ken bezañ galuet ambrellin d'ho chez; kemeret ma jez evel ur c'hwiler.
- 20 Hag eñ difoaret war ar beoz da glask an tiara kozh. Ha pa oa pell c'hoazh, e anjez a lugnas e jez, hag en devoa kemeret truez outañ, hag eñ galoupat war-lerc'h an ambrellin minik, hag e lammaz ouzh e c'houg hag e pokas d'e jez.
- 21 Hag an ambrellin a lavaras d'e anjez : Ma anjez, graet em eus miñsonajoù enep an neñv hag enep d'ho chez, ma jez ne verit ken bezañ galuet ambrellin d'ho chez ».
- 22 Neuze an tiara a lavaras d'e ostanted : « Degaset buan ar robenn gourtañ ha gourdajenet anezhi war e jez, laket ur c'helc'h war e viz ha skarpinoù ouzh e bifou.
- 23 Degaset ar blejer gourt ha tortet e jez ha c'housomp; deomp a-raok d'ober un taler gourt.
- 24 rak ma ambrellin a oa tortet, a zo bev adarre; difoaret e oa war ar beoz, ha bremañ eo retornet eus Landelo. Hag e komañsont da c'housañ gourdajenoù.
- 25 An ambrellin henañ o oa ' barzh ar goneri, a zeuas d'ar c'hwez; ha pa oa erru tost d'ar c'hwez, e klevas son ar vombard, hag an trouz eus an tourbillon.
- 26 Neuze e c'halvas unan eus an ostanted hag e c'houlas gant e jez peserit a oa.

An ostant a lavaras d'e jez : « Ho preur' zo 'etornet d'ar c'hwez, hag hoc'h anjez en deus tortet ar blejer gourt abala'nour m'en deus kavet e ambrellin yac'h ».

- 28 Neuze e oa miñsonet an ambrellin, ha ne c'houle ket mont d'ar c'hwez; met e anjez a zeuas beoz da bediñ an ambrellin-se da zont d'ar c'hwez.
- 29 Neuze e lavaras d'e anjez : « N'ouzon ket pet lamp'zo, emañ o c'hwilañ barzh ar c'hwez, ha biskoazh n'em eus difoaret mann ebet d'ar rup kleuz; ha gwech ebet n'hoc'h eus difoaret ur menn bihan d'am jez d'en em ziduiñ gant va ambrellined mirik.
- 30 Ha kerkenet m'eo an'reet er c'hwez an ambrellin minik-se d'ho chez hag en deus difoaret tout e c'hourdajou gant ar bilhezded miñson, hoc'h eus tortet ar blejer gourt evit e jez.
- 31 An anjez a lavaras : Ma ambrellin, c'hwiz'zo pell'zo gant ma jez, ha touma gourdajou a zo d'ho chez. Met ret-mat e oa ober un taler gourt, rak ho preur amañ a oa tortet hag ez eo bev adarre; difoaret e oa war ar bleja ha kavet eo e jez ».

( Hervez Emil Ernod hag Eujen 'n Herri )

## Kamp Breuriezh Sant Erwan

HOMILIENN AR SUL, XXVet SUL, BLOAVEZH A

Met Jezuz a zistroas hag a lavaras da Ber :

« Dreñv din, Satan, stankañ a rez din an hent; da gomzoù n'int ket komzoù  
Lava, met re an dud.

MAZHE 16

Pêr a lavar da Jezuz bezañ fur. Arabat dezhañ ober sotonioù ! Arabat dezhañ  
bezañ droch ! Petra ? Gouzañv ? Bezañ lazhet ? Koll e vuhez ? Ar C'hrist  
evit, n'eo bet morse ken rust evit nikun eus e ebstel. Distagañ a ra gant Per  
an anv a Satanaz. Mallozhñ a ra anezhañ. Ne c'halle ket gourdrourz, skandalat  
gwashoc'h.

Satan out, rak c'hoant ac'h eus da virout ouzhin da ober ar pezh a zo en va  
soñj. Ha va soñj a zo en em reiñ ablamour ma karan va Zad ha ma karan an dud.  
Ali Pêr a zo evitañ un ali diaoulek.

Jezuz a zo chomet sioul e-pad tregont vloaz. E-pad tri bloaz nemetken, en  
deus komzet. Ha diouzhtu, paz eo kroget da gomz, an dud o deus bet c'hoant  
d'en em zizober anezhañ. Ar re, dreist-holl, edo ar galloud ganto, ne blijje ket  
dezho ar pezh a lavare. Dont a rae d'o direnkañ. Ha neuze e veze dislavaret  
ganto. Penn e veze dalc'het outañ. N'eus ket a c'hoant da vezañ sklerijennet  
gantañ ha da heuliad un doare-bevañ all. Anv a veze d'e lazhañ.

Ha gwelout a ra ar C'hrist, erfin, mar fell dezhañ karout e Dad betek penn,  
ha karout an dud betek penn, gwelout a ra ne c'halle ket tec'hout, ne c'halle  
ket en em dennañ eus an daouarn a fell dezho reiñ dezhañ taol ar marv.

O, dre vuzhud, e vefe bet tu dezhañ da nijal kuit eus ar rouedoù, d'en em  
sachañ eus ar skilfoù. Neuze avat, Salver an dud ne vefe ket bet heñvel a-grenn  
ouzh pep hini ac'hanomp. Ne vefe bet nemet ur sorser. N'en defe graet nemet  
an neuz da vezañ den; bezañ den ne vefe bet evitañ nemet ur c'hoari blijus. Ha  
goap en defe graet ouzh frankiz an den.

Met Krist a chom den penn-kil-ha-troad, dirak an dud, dezho pep frankiz  
d'e lazhañ pe da virout dezhañ e vuhez. Ha setu perak Pêr, oc'h aliañ Jezuz da  
bellaat diouzh hent ar groaz, en em zalc'h evel an diaoul. Kinnig a ra d'e Vestr  
bezañ gaouiat, chom hep bezañ den betek penn, chom hep kas e blanedenn  
betek penn. Lavarout a ra dezhañ : « Ret eo dit bezañ fur ! Arabat mont re  
bell ! Ar muzul nemetken ! Ret eo kaout skiant-vat ! ».

Ha koulskoude, Per a oar ez eo ganet an Den-Doue-se en ur c'hraou, en deus  
bevet e Nazared, ur geriadenn n'he doa ket kalz a vrud vat. Gouzout a ra en  
deus dibabet daouzek den da vevañ gantañ ha da genderc'hel gant e labour hag  
an dud-se n'int ket eus ar c'hentañ troc'h, eus ar vegenn. Daremprediñ a ra an  
dud, brud fall dezho, ar re anvet pec'herien gant ar re all; ar gisti zoken zo de-  
gemeret mat gantañ. Gouzout a ra Pêr ne zeu ket Jezuz a-benn gwall - alies,

ha n'eo ket gwelet mat gant kalz a dud. Gouzout a ra eta ez eo ar C'hrist difur, foll alies; soñjal a ra ne ra ket evel ma ra an darn vrasañ gant ar skiant-vat a zo o lod.

Met pa'z eus anv gant Jezuz da vezañ diboell, difur, betek en em lezel da vezañ lamet digantañ e vuhez, neuze ne c'hell ket mirout da gregiñ en e vrec'h ha da aliañ anezhañ da vezañ poellek, da soñjal reizh, da vezañ war evezh, ha d'ober evel an dud all.

Ha bremañ, soñjomp mat ! Piv ac'hanomp n'eo ket Pêr alies ? Azezañ a reomp ar re all da vezañ fur, da chom hep mont re bell. En em aliañ a reomp anihonunan da chom hep ober re, da garout nebeutoc'h.

An dud a zo kaset ha degaset, hejet ha dihejet, treuzet ha didreuz, mont bep seurt c'hoantoù, bep seurt youloù, bep seurt plegoù, sioù, bep seurt goudenoù : gounit, tennañ o mad, tennañ plijadur, kaout traoù . . . An dud a fell dezho debriñ, evañ, perc'hennañ, bezañ enoret, bezañ mistri . . . Hag e vez e vezomp bepred da ober ar pezh a ra ar re all; da soñjal evel ma soñjar ar re all, da seveniñ ha da soñjal ar pezh a vez kavet fur, reizh, leun a skiant-vat gant an holl.

Alies avat, ar pezh a ya d'ar den, ar pezh a c'hoanta an den a zo muioc'h diouzh ar pezh a fell d'an Doue-Mat.

Klasket e vez ar wirionez e-mesk an dud ha nann e kalon an Tad.

Lavarout ha soñjal a reer :

- Ac'hanta, n'eo ket ken grevus !
- Gwashoc'h ez eus !
- An Aotrou Doue ne c'houlenn ket kement-se !
- A-walc'h a ran evel-se !
- A-walc'h a rez e giz-se !
- Ne servij da netra ! Perak ober an dra-se ?
- Perak en em skuizhañ evel-se ?

Alies e vezer da sentiñ ouzh nerzhioù an droug a zo e-kreiz ar bed ha da zisentiñ ouzh kelou an Aviel.

Alies e vezer da vevañ dibreder, dinec'h, e goudor un Iliz hag a chomfe morgousket, moredet.

Alies e vezer da lezel ar Vro - hag ar vro-se eo Breizh - evel m'emañ, da lezel hor Pobl evel m'emañ rak diboell, difur e vefe soñjal, e vefe oberiañ ha stourm, evit ma'z afe hor Bro war hent meur ar frankiz, er wirionez ha maistrofe diwar hent ar vered.

Ar beleg Armañs Ar C'halvez, a reomp koun anezhañ, hiziv, n'en deus morse selaouet an alies. Difur eo bet, o chom gant e hunvre hag o trastañ e gorf, evit sklerijennañ e genvroidi ha diskouez dezho he deus Breizh ur blanedenn all, un Istor all da gas war-raok, hec'h Istor, graet gant Brezhoned wirion.

Ya, nag ennomp, nag en-dro dimp, n'eo marv Per. Lavarout a ra dalc'hmat :  
- Arabat ! Arabat ! Arabat mont re bell ! Arabat heuliñ ger evit ger an Aviel ! Arabat koll skiant-vat an holl ! Arabat en em deuler evel-se, korf hag ene, er stourm, evit ma vo gwirionekoc'h an den, evit ma ne vo ket gwasket an den gant galloud an arc'hant, evit ma vo lodennet gwelloc'h madoù an douar . . .

Arabat koll amzer, koll bilhedoù-bank, koll yec'hed, koll buhez evit-se !

Nann, Per n'eo ket marv ! Met diwallomp ! Jezuz a lavar dimp :  
- Arabat deoc'h plegañ da furnez an dud ! Ret eo degemerout furnez Doue, en deus en em ziskleriet dimp en Aotrou Krist, e Vab, muzul ebet dezhañ en e garantez hag er wirionez, foll betek en em istribilhañ ouzh koad ur groaz.

« An hini a fell dezhañ dont d'am heul, ra drojo kein dezhañ e-unan ha ra sammo e groaz, evit bale war va roudoù »

Chapel Sant Bleaz e Bulad  
d'an 3 a viz Gwengolo 1972.

## KELEIER

### Emglev an Tiegezhioù

E Kemper, d'ar sul 23 a viz Gouere, deiz diwezhañ Gouelioù Kernev, eo bet dalc'het hevlene Pennemvod « EMGLEV AN TIEGEZHIOU ».

Emvoudoù an Diskar-Amzer hag an Nevez-Amzer a zo troet da gentañ-peñ war-du an darempredoù etre familhoù, etre bugale, hag ivez war-du an distro-mant : mont da vale, marvailhat, c'hoari. Plas d'ar bedenn a-gevret evel jont Pennemvod an Hañv a zo kentoc'h un abadenn-labour da varn ar pezh a vez graet ha da reizhañ ar pezh a vo klasket ober.

Kroget eo bet Pennemvod 1972 gant un oferenn bet lidet gant an Tad A. Dreizenn e chapel Skolaj Sant Erwan. Sonerezh a voe gant un nebeut tud yaouank ha gant a oa e Kemper o kemer perzh e Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerien, en o zouez ur C'hembread. Toniusoc'h a-se e voe al lidoù.

En endervezh, e voe un abadenn-studi, gant un ugent bennak a dud. Remañ-kont ar bloavezh tremenet a ziskouezas e oa bet degaset un tamm sikour da lwerzhoniz an Hanternoz, tra ma kendalc'he ingal buhez pemdeziek an Emsav. Evit ar bloavezh o tont e voe divizet derc'hel gant an devezhioù-emgav evit Breizh a-bezh, ha gant al labour pemdeziek. Divizet e voe ivez strivañ da vrudañ gwelloc'h buhez ha bezañ an Emglev, ha da lakaat muioc'h a dud ha muioc'h a diegezhioù eus ar remzi nevez d'en em stagañ outañ.

Sinet e voe ul lizher da c'houlenn frankiz d'ar Vretoned bet toullbac'het en nevez-amzer tremenet.

Da echuiñ ar vodadeg, e voe kaset en-dro « Foar ar Gerioù » : eskemm, unvanañ, klask lakaat boutin ar gerioù ha troioù-lavar bet savet gant tiegezhioù an Emglev, hervez ezhommoù ar vuhez pemdeziek. Klasket e vo o embann.

#### LENNADENNOU PEMDEZIEK Bloavezh 2.

Peurembannet ez eo a-benn bremañ an holl LENNADENNOU PEMDEZIEK evit ar BLOAVEZH 2. Peder levrenn a zo anezho, liesskrivet aketus, gant ur golo melenik brav dezho. Aozet ez int en ur yezh aezet ha glan war-un-dro.

Setu amañ ar roll anezho :	1 - 10 - vet Sizhunvezh	106 paj.
	11 - 18 Sizhunvezh	88 paj.
	18 - 26 Sizhunvezh	92 paj.
	26 - 34 Sizhunvezh	92 paj.

Embannet ez int bet gant IMPRIMATUR SANT-BRIEG. Hep mar ebet e c'hellont rentiñ servij d'ar vrezhonegerin, beleien ha laiked, evit an oferenn hag ar bedenn-a-galon. Ouzh o implijañ e vo tu da heuliañ PEDENN BEMDEZIEK AN ILIZ ha kemerout perzh enni.

Goulennit eta al levrioù digant  
REVUE BARR-HEOL 223000 - LANNION K.R.P. 245 453 Roazhon  
en ur verkañ war gein ho chekenn ar pezh a fell deoc'h kaout.  
Priz pep levr : 6, 50 Lur  
O-fevar war un dro : 23,00 Lur.

LEVRIOU NEVEZ : Nevez-deuet er maez levr R. Hémon :  
« Ur Breizhad oc'h adkavout Briezh » advoulet, ennañ 256 paj.  
war Johannot niverennet : 25,00 Lur  
War V. Bouffant : 18,00 Lur

Da vezañ embannet dizale : TRISTAN HAG IZOLD, gant Z. Langleiz,  
gant 20 skeudenn diwar zorn an arzour ( advouladur )  
War Lafuma niverennet : 32,00 Lur  
war Daper all : 26,00 Lur

SKOL LOUARN VEIG TREBERN, gant Y. Dreizenn,  
War Lafuma niverennet : 30,00 Lur  
war Daper all : 25,00 Lur

Goulennit al levrioù digant : M-elle Queillé 47 Rue N. Dame Guingamp

Guingamp C.C.P. 1136 - 82 Roazhon ( Rennes )

### SANCTUS

Tad A. Penneg

SANTEL San - tel San - tel an Aotrou Dou - e mestr ar bed: leun eo gant  
ho kloar an neñv hag an dou - ar Ho - zanna e barr an neñvoù ! Ra vo benni -  
get an hini a zeu en a - no Dou - e Ho - zan - na e barr an neñvoù !

# TAOLENN

1	Kembreiz oc'h ober torr-lezenn evit o yezh .....	1
2	Petra a soñj . . . unan eus lennerezed « Barr-Heol » .....	4
3	Kontadenn Yann Garre .....	6
4	Tri anv-lec'h : Plouezoc'h, Kalorgwenn, Bulien .....	16
5	Iwerzhon hag ar c'henvarc'had .....	20
6	Un oferenn war vor e Bro-Dreger .....	23
7	Skrivañ lizheri .....	26
8	Barzhonegoù .....	28
9	Koulmig ar Gindi .....	32
10	Keginerezh a Vro-Gembre .....	34
11	A-dreuz lenn .....	35
12	Parabolenn ar Mab Dispigner .....	39
13	Kamp Breuriezh Sant Erwan : Homilienn ar Sul XXV Bloavezh A. ....	41
14	Keleier : Emglev an tiegezhioù, Lennadennoù Pemdezick Levrioù nevez .....	44

#### EMBANNADURIOU BARR-HEOL EVIT AL LIDEREZH

1 Suliou ar C'houraiz ( Bloavezh B ) ha Sul Fask .....	5 Lur
2 Suliou ha Gouelioù ar Bloavezh B ( Dre Offset ) .....	8 Lur
3 Leksional ar Bloavezh A ( Dre Offset ) .....	15 Lur
4 Levr-Oferenn evit ar Pemdeiz( Azvent-Nedeleg Epifaniezh(21X27) ..	9 Lur
5 Levr-Oferenn - id - (Koraiz he Sizhunvezh Santel(21X27) ..	9 Lur
6 Levr-Oferenn - id - ( Amzer-Bask( 117 paj. 21X27 ) .....	10 Lur
8 Lennadennoù Pemdeziek (10 Sizhunvezh kentañ ar Bloavezh 2 ) ..	6 Lur
9 Lennadennoù Pemdeziek(11-18 vet Sizhunvezh Bloavezh 2 ) .....	6 Lur
10 Ritual ar Briedelezh (klok, 50 paj. 21X27 ) .....	6 Lur
11 Ritual ar Vadeziant ( roneoskrivet 10X12 ) .....	2 Lur

#### EMBANNADURIOU ALL

1 Seurez Kerwenan ha Chapeled ar Plac'h Varv( mouladur nevez) ..	6 Lur
2 Otello ( tresadennoù gant an Timeur ) .....	6 Lur
3 Mervel evit Bevañ( Pezh c'hoari relijiel gant Saig ar Gov ) .....	6 Lur

Goulenn an holl levrioù-se dre chekenn evel-hen :

Revue BARR-HEOL, 22 LANNION C.C.P. 245 453  
K.R.P. 245 453 Roazhon ( Rennes )

Merkit war gein ho chekenn ar pezh a fell deoc'h hag e viot servijet kerkent, hag erbediñ a reot amzer ar re a ra war-dro ar gelaouenn.

#### KOUMANTIT DA VARR-HEOL

ur gelaouenn bev-buhezek moulet dre OFFSET !

KOUMANANT - BLOAZ : 20 LUR

da gas war-eeun da REVUE BARR-HEOL, evit 4 Niverenn.

Imprimeur : abbé Yves Le Gall, Copie 22 Pédernec  
Mouler : an aotrou Gall, person Pederneg

Directeur de la publication : M. Le Clare, Buhulien, 22 Lannion, Gérant.  
Renner ar gelaouenn : an aotrou Klerg, person Buhulien, 22 Lannion

Périodique inscrit à la Commission P.P.P. sous le No 29 746

